


ARAOK KOVEZ



E LANDERNE,
Moulet gant J. DESMOULINS,
Rû La Fayette, 7,
1907

—
Propriété de l'Éditeur,



KENTA LODENN

Sakramant ar Binijenn.




*Eunn nebeut sklerijenn araok ann Examin
a goustians.*

Oll on euz c'hoant da zavetei hon
ene, da vont d'ar barados. Red eo eta
kemer ann hent a gass di ; anez a-ze
biken n'en em gavimp. Hogen, daou
hent hebken a ren ar c'bristen d'ann
Env ; hent eur vuez dibec'h, dinam
goude ar Vadiziant, pe hent ar binijenn.
Ann hent kenta a zo heuliet gant ar
vugale pe ar re vraz, a zo bet badezet,
hag ar varv heb beza great eur pec'hed
marvel. Ann hent-ma a zo, a dra zur,
ann essa hag ar zurra. Kompessoc'h eo,
ha kass a ra ann ene kristen var eunn
d'ar Baradoz. Mez rouez int, ha rouez
braz zoken, ar re deuet oad a rezoun
dezho, hag a gendalc'h var ann hent-ze.
Touellet omp buhan gant ann ourgouill,

ha bresk omp evel eur gorzenn. Lunn netraik a ra deomp terri. Piou n'hen deuz ket desket kement all divar he goust? N'oamp ket eat pell marteze gant hent ar vuez-ma, siouas ! m'oa dija sklabezet ganeomp sac venn hor Badiziant dre ar perc'hed marvel. Eur vech kouezet enn eur pec'hed marvel bennag, stanket ouzomp raktal ha da viken ann hent kenta. Ne c'heller reseo Sakramant ar Vadiziant nemet eur vech. Chom a ra digorr dirazomp ann eil hent, hent ar binijenn, ha ne jom nemethan.

Daoust ma z'eo tennoc'h ann hent-ma, hent ar binijenn, difazi eo goulskoude evit ann nep a gemer kelennadurez hor Mam Zantel, ann Iliz Katholik, da hentcha anezhan : Setu kefridi al leorik-ma. Ra zeuio grass ann Aotrou Doue da zikour anezhan enn he labour. Kaloun Zakr a Jesus, ho pet truez ouzimp. *Cor Jesu Sacratissimum, miserere nobis.*



I. — AR PEC'HED ORIJINEL.

SAKRAMANT ar Binijenn a ro deomp ar Spardoun, euz ar pec'hejou, a vez great goude ar Vadiziant.

Hanvet eo ann eil plankenn goude ar pense. Sakramant ar Vadiziant eo ar c'henta plankenn, taolet deomp, bugelik nevez ganet, gant ann Iliz Katholik, a berz hor Zalver benniget, Jesus-Krist. Rak, kerkent ha ma teu buez ennomp, araok zoken dont er bed, hon ene a zo saotret gant ar pec'hed, ha dre ze, dare da vont da goll.

Eur vech ma eo korf an den konsevet, ann Aotrou Doue a ra ann ene euz a netra, hag ann ene-ze, nevez krouet gant Doue ; a zeu raktal den em unani gant ar c'horf, prest d'hen reseo. Ar penn

kenta eo euz buez' ann den, var ann douar-ma. Mes, ann ene ne c'hell ket en ein unani gant ar c'horf, heb tenna var-nezhan drouklans ann Aotrou Doue, hep dont da veza sklavour ann drouk-spered. Ann Aotrou Doue en deuz kaz ouz ann ene ; rak er stad reuzeudik-ze, evel ma stagfe eul loustoni ouz ann ene eo, hag al loustoni-se a zo galvet ar perc'hed orijinel. N'euz nemet unan, hag a ve bet diouallet dioc'h al loustoni-se ; hag hounnez eo ar Verc'hez Glorius Vari, konsevet hep pec'hed, dre veritou Jesus-Krist.

Mar deo saotret ann ene gant ar pec'hed, kerkent ha ma teu he-ma d'en em unani gant ar c'horf, eo abalamour da zizentidigez Adam hag Eva. Dre ho dizentidigez, ar re-ma a gollas mignouniach ann Aotrou Doue, ann donezonou dreist-natur, ho doa bed diganthan, hag ar guir da vont d'ar Barados. Kouezet int neuze, siouas ! dindan galloud ann drouk-spered, hi hag ho bugale. Lezet ho deuz ar c'hollou-ze, enn heritach, gant ho bugale, koulz lavaret, ganeomp oll ; p'eo guir, e tiskennomp oll euz ann daou zen kenta.

Dre ho fec'hed e bet dismantret ene ha korf ann den evel ma voant bet krouet gant ann Aotrou Doue. Ar ioulou fall a zirollas enn ho c'haloun. Pa c'hlabouser ann dour, enn eur feunteun, al lec'hid a zav var gorre. Kement-ze a ro deomp da anaout al labour, a reas ar pec'hed enn Adam hag enn Eva. Dioc'h eur feunteun, ma n'eo ket sklear ann dour ennhi, ne zired ket a zour neat anezhi. Setu perag, evel eul loustoni a stag ouz hon ene, araok zoken dont er bed. Chomet eo ganeomp var lerc'h hon tad hag hor mam genta, ar penn kenta euz vouenn ann dud, a zo var ann douar. *Origo*, pec'hed orijinel a zinifi pec'hed a zeu euz ar penn kenta.

Dizentidigez Adam hag Eva a ioa mad, evit ober da Zoue, dilezel ann den da viken. Ken madelezes e oa bet evitho ! Ha breman e vele ervad, n'oant nemet bugale digaloun, bugale hag ho doa ankounac'heat he vadoberou, great fae var he c'hourdrouzou, en em lakeat, a vontez vad dindan galloud Satan, he enebour touet. Kement-se a ioa, dra zur,

aoualc'h evit lakaat Doue d'ho dilezel. Petra a ioa en em gavet gant Lusifer pe Zatan ? ha gant ann drouk-elez, a du gant-han ? Ar sperejou kaer-ma n'ho doa lavaret nemet eur vech da Zoue, ho Mestr hag ho C'hrouer, ne zentimp ket, *Non serviam*, dallet ma'zoant gant ann ourgouill. Raktal, int bet stlapet enn Ifern da viken, ker buhan hag eunn tarz kurun. Ann Aotrou Doue ne espernas ket anezo. *Deus Angelis peccantibus non pepercit.*

II. — JEZUS-KRIST, HOR ZALVER.

ANN Aotrou Doue a c'helle ivez barn ad'ann Ifern hon tad hag hor mam genta, dioc'htu goude ho dizentidigez, ha serra, ouz ho lignez, dor he Varados. Nan, n'eo ket falvezet dezhan. Pell ac'hanol ! Karet en deuz ac'hanomp, eme ann abostol Sant Paol, gant eur garantez dreist muzul, *propter nimiam charitatem, quā dilexit nos*. Ann den paour, touellet gant Satan, ar speret fallakr-ze, eur vech kouezet, ne voa ket goest da zevel enn he zav, dreizhan he unan. Evit he zave-tei, Doue a gavas mad rei he Vab ha n'en

deuz nemethan. Ann eil Ferzon euz ann Dreinded Sakr a ziskennas euz ann Env var ann douar, hag en em c'hreas den. *Et verbum caro factum est*. Muioe'h en deuz great ! Ouz ar pec'hed oa stag ar maro, *morte morieris*, hag evel ma pae e dle ar pec'hed. Mab Doue, en em c'hreat den, a c'houzanas ar maro, ha zoken ar maro var ar groas. En eur ginnig eur vech he vuez da Zoue, he Dad, divar ar groas, hor Zalver Jesus-Krist en deuz peur-c'hounezet meritou, grassou goest da zantelaat, evit mad, ann oll eneou. *Unda oblatione, consummavit in sempiternum sanctificatos.*

III. — ANN ILIS KATHOLIK, HOR MAM.

MES, penaoz lakaat ann eneou da gaout Mperz er meritou, hag er grassou peurgounezet, gant hor Zalver benniget, dre he varo var ar groas ? N'eo ket aoualc'h kaout eunn tenzor, ma chom serret. Digorret e vezo ; rag, alc'houeziou a vezo great, hag ann alc'houeziou-ze eo ar Zakramanchou. Ann alchoueziou-ze a zo bet zoken fiziet e Sant Perr, enn hon

Tad Santel ar Pap, a zalc'h plaz Sant Perr, enn Eskibien ; enn eur ger, fiziet int bet, gant hor Zalver he unan, enn Iliz Katholik, he fried, karget da gass da benn silvidigez ann eneou.

IV. — SAKRAMANT AR VADIZIANT.

KENT-AZE, a veac'h ganet, omp bet digasset, gant hon Tad, d'ann Iliz. Eno, eur beleg, aberz hor Zalver Jesus-Krist, en deuz skuillet, var hor penn, dour Sakramant ar Vadiziant, en eur lavaret er memes amzer : « Me ho padez, enn hano ann Tad, hag ar Mab, hag ar spered-Santel. » Kerkent, dre Veritou Goad sakr hor Zalver, hon ene a zo bet neteat dioc'h loustoni ar pec'hed orijinel. Guisket euz bet deshan, evel pa lavarfenn, eur zae gaer, guenn kann. Hon ene a ioa neuze pur, dinam dirak daoulagat ann Aotrou Doue ; hag el leac'h kaout, enn ene-ze, pe a dra da facha, evel diagen, Doue en doa tro da lavaret, goude ar Vadiziant : « Heman eo va Mab muia karet, e pehini em euz lakeat va oll flijadur. » Goad sakr hor Zalver Jesus-Krist, en eur goueza var

hon ene, gant dour ar Zakramant, en deuz roet deomp eur vuez nevez, ar vuez gristen ; hag omp deuet da veza bugale da Zoue, ha da gaout guir da heritou d'hon Tad, pehini a zo enn Env, da vont d'ar Barados.

V. — AR PEC'HED AKTUEL.

PEGEIT amzer e chom hon ene er stad santel, ma eo bet lakeat ennhan dre Zakramant ar Vadiziant ? Epad hon bugleach, dor an ene a zo, koulz lavaret, serret. Stlabez ebet n'a c'hell mont ennhan, na koueza varnezhan. Gant ann oad e teu ar skiant : ha setu digorr spered, ene ann den. Var dro ann oad a zeiz vloas, eo digorr aoualc'h evit anaout ar mad dioc'h an drouk, choas a c'hell etrezho, neuze, etre senti pe zizenti ouz Doue, etre ober ar peza c'houar n'e ket difennet, hag ar peza c'houar a zo. Hon dever eo, hag hon interest eo ivez, e pep giz, chom start a du gant ann Aotrou Doue, miret ar zae venn, guisket d'hon ene, dervez hor Badiziant. Mez, siouas ! ken douget omp d'ann drouk, ker simpl

ha ken kresk, ma omp, re aliez hag hep dale, touellet ha trec'het gant goall ioulou ar galoun, gant skoueriou fall ar bed, pe gant ardou ann drouk-speret. Pri ann douar-ma en em stag ken buan ouz ann den paour ! Ober a reomp, evel guechall Lusifer, egis pa lavarfemp d'ann Aotrou Doue, ne zentinn ket ouzoc'h, ne fell ket dinn ho servicha ; ha setu kaillaret ganeomp sae venn hor badiziant : kollet adarre enn dro ar guir da vont d'ar Barados. Setu ni en em lakeat, a volontez vad, var bordik puns ann Ifern. Bagig hon ene great pense ganthi ! Daoust ha Doue hen lezo enn abandoun, ha da vont da goll ? Savetet eo bet dija eur vech ganthan, dre Zakramant ar Vadiziant !

VI. — SAKRAMANT AR BINIJENN.

NAN, nan, hor Zalver Jesus-Krist, gant ar garantez dreist muzul en deuz evit ann den, a daol d'an ene evel eur plankenn den em zavetei, eunn eil guech : hag ar plankenn-ze eo Sakramant ar binijen ; a neta ann ene, en eur

rei dezhan ar pardoun euz ar pec'hejou, great ganthan, goude ar Vadiziant.

« Ar peoc'h ra vezo ganeoc'h, eme hor Zalver d'he Ebestel goude ma oa savet euz a varo da veo, evel m'oun bet digaset gand va Zad, evelse me ho kass d'am zro. » Neuze, eme ann aviel, e c'houezas varnho, hag e lavaras adarre : « resevit ar Speret-Santel ; ar pec'hejou a vezo pardounet d'ar re m'ho pezo ho fardounet ; ha ne vezit ket pardounet d'ar re n'ho pezo ket ho fardounet. »

Hor Zalver a vezo zoken madelezuz aoualc'h evit taoler ann eil plankenn-ze d'hon ene, bep tro ma rei pense. Neuz pec'hed ebet, eme Katekis ar Sened a Drant, daoust peger braz ha pegen grevus e ve, ha ne deuffe ket Sakramant ar binijenn da bardouni, neo ket eur vech hepken mez diou vech hag aliessoc'h. « *Nullum est enim tam grave et nefarium scelus quid pœnitentiæ sacramentum, non quidem semel sed iterum et sæpius non debeat.* » — Eunn dervez, ann Abostol sant Per a c'houlennas digant hor Zalver : « Mestr, pet guech, e renkinn-me par-

douni d'am breur, pen devezo va offan-
set ? betek seiz guech ? » Ha Jesus ha res-
pontas : « Ne lavarann ket deoc'h betek
seiz guech hebken, mes beteg dek ha tri-
guent guech seiz guech. » — Penaos eta
goudeze, dizesperi ha kredi, ne c'hel-
lomp ket beza pardounet gant ann Ao-
trou Doue, abalamour ma on euz great
re a bec'hejou ?

VII. — PED LODENN E SAKRAMANT AR BINIJENN ?

EVIT pardouni hor pec'hejou deomp,
n'euz forz pegen stank ha pegen gre-
vus e vent, ann Aotrou Doue a c'houlenn
diganeomp, eme ar Sened a Drant, tri
zra : 1^o kaout keuz d'hor pec'hejou, 2^o ko-
vez, 3^o digoll ann Aotrou Doue, pe ann
nessa euz ann droug, a c'helfemp da
veza great dezhan. « *Ab integram et per-
fectam peccatorum remissionem requiri tres
actus in pœnitente, quasi materiam sacra-
menti pœnitentiæ. videlicet contritionem,
confessionem et satisfactionem, quæ tres pœni-
tentiæ partes dicuntur.* » Cap. IV. sess. XIV.
Galvet int ann teir loden euz Zacr-
mant ar binijenn.

VIII. — AR GOVESSION.

AR gonstrision, al lodenn genta euz
Sakramant ar binijenn a c'houlenn
beza lakeat sklear ha difazi dirag ho
taoulagad. Abalamour da-ze, kaout a raf-
fot ama valerc'h eur gevrenn he unan
divarbenn ar gontrision. Staga a reomp
dioc'htu gant ar govession, red eo da
vihana kovez hon oll pec'hejou marvel.
Mes, penaos kovez hor pec'hejou, ispisial
ho pec'hejou marvel, ma ne anavezomp
ket mad anezho ? Ha penaos ho anaout
mad, nemed oc'h avessaat hag o sonjal
mad ennhô, nemet o tiskenn e guele
ho c'houstians, da ober eunn enklask
piz anezho. N'eo ket eaz derc'hel, sonj
euz a gement pec'hed a ve great, dreist
oll pa vezer lezirek da vont da govez.

IX. — ANN ENKLASK A ZO RED.

RED eo, eme ar Sened a Drant, ober
ann enklask, dre examin a goustians,
gant preder hag gant aket, *cum debita et
diligenti præmeditatione*. Lakeomp, evit
ober hon examin a goustians, ar memes

evezded, a lakat peurliessa tud ar bed da ober ho afferiou braz. — Ar micherour, abarz ober priz da zevel eunn ti, a evesaio pegement a gousto ar vein, ar raz, ar c'hoat, hag ann traou-all. Ne vezo ket red lavaret dezhan : « diouallit n'ho peffe koll ? » Ober a ra he zonj, he examin ; ha guellet a reio, tost da vad, pe hen a c'hello gounid, pe n'a c'hello ket. Ar memes tra a c'heller da lavaret euz ann oll varc'hadourien. Setu ar zoursi, ar boan a gemerer er bed evit dastum eunn nebeut arc'hant, eunn nebeut madou, traou na virent den ouz ar maro da zont, traou ha ne gassont ket ac'hanomp d'ar Barados. Rak-ze, da vibana, taolomp ar memes evez da examina hor c'houstians. Red eo kovez ann oll bec'hejou marvel. Menek zo da c'hounit madou kalz talvoudusoc'h, ar vuez hag ar iec'hed d'ann ene, var ann douar-ma, hag ar guir da gaout perz divezatoc'h enn eurusted, a bado da viken.

X. — PED SEURT PEC'HEJOU AKTUEL-ZO ?

N'eo ket aoualc'h ober ann enklask euz hor pec'hejou gant evezded ; red eo c'hoas anaout talvoudegez ar pez on euz great a eneb lezen Doue. Rak, terri a c'heller he lezenn, e pemp doare : pa zonjer, pa c'hoanteer, pa lavarer, pa reer eunn dra bennag a eneb al lezenn-ze, ha pa jomer heb ober eunn dra bennag gourc'hemennet ganthi. Mes ann traouze oll a zo braz pe viban, pec'hejou marvel pe pec'hejou veniel. Kemm braz a zo etre an daou seurt pec'hejou aktuel-ze ! Ar pec'hed marvel a ro ar maro d'hon ene, oc'h ober dezhan koll grass Doue, hag hon laka var hent ann Ifern. Ar pec'hed veniel hen na ra ket deomp koll grass Doue, na beza koundaounet d'ann Ifern ; lakaat a ra karantez Doue da zemplat ennomp, digerri a ra an hent d'ar pec'hed marvel, hag a ra deomp meritout poaniou ha ne badint ket atao pe er bed-ma pe er bed all. Ar pec'hed veniel a laka hon ene, evel pa lavarfenn, da glenvel.

XI. — PETRA EO PEC'HI MARVELAMANT ?

E vit ober eur pec'hed marvel, tri zra
a zo red, hed mank ebet : eunn dra
vraz, eunn anaoudegez vad, hag eur vo-
lontez leun.

1^o Eunn dra a zo braz — pe dreizhan
he unan, evel ma ' eo blasfemi, adori
doueou faos, nac'h eur virionez bennag
euz ar feiz, ann herezi, ober eur fals-le-
touet, en em ganna e duel, laza, ober ar
pec'hed lour, ann avoultriach — pe aba-
lamour d'ar gaou braz, great ouz hon
nessa, evel ma' zo : laerez, trompla, laza
etc. — pe c'hoas abalamour d'ar c'holl pe
da eur gaou braz, great ouzomp hon unan.

Ar pec'hed a c'hell beza grevus, hervez
intansion ann hini a zoug al lezenn. Rag,
ann hini a zoug al lezenn, a c'hell gour-
c'hemenn eunn dra zister dreizhan he
unan, dindan boan a bec'hed marvel :
hag he intansion a zo eaz da anaout, dre
he gomzou, dre ar boan a stag ouz al
lezenn, ha dre ali ann dud fur ha gouziek.

2^o Anaoudigez vad. Ar spered a rank
gouzout, enn eunn doare bennag, e zer

da bec'hi, da offansi ann Aotrou Doue
enn eunn dra vras.

3^o Eur volontez leun. Ar galon pe ar
volontez a dle assanti. Kement tra a
greskfe pe a vihannafe ann assant, a vi-
hanna pe a gresk malis, pe c'hrevusded
ar pec'hed : da c'houzout eo, ar pec'hed
a vezo braz pe vihan, marvel pe veniel,
hervez ann evezded, ann anaoudegez,
hag hervez ann assant. Evel kent, mar
d'eo ann den chomet dre he faot heb
anaout a lezenn en deuz torret, neuze ar
pec'hed a vezo atao ar pez ma z'oa dia-
gent. Kaer a vezo kredi n'oa nemet eunn
dra zister, e vezo atao eunn dra vraz.

Epad ma stourm ar volontes, ne zeuz
pec'hed ebet. Ann dentation ne deu da
veza eur pec'hed, nemet pa assant ar
galoun dezhi.

XII. — PETRA EO PEC'HI VENIELAMANT HEBKEN ?

Ar pec'hed a vezo bihan pe veniel
hebken, pa vez eunn dra a nebeut, a
gonsekans, pe pa ne vez ket bet taolet
evez mad, ha pa ne vez ket a volontez
leun. Ma vank unan euz ann tri zra-ze,

ar pec'hed ne deo nemet veniel; evel-se, ma tizenter ouz Doue, enn eur poent dister, mar d'eo dister ar gaou great ouz ann nessa, ar pec'hed ne deo nemet veniel. Er memes tra, ma n'em euz ket bet amzer da zonjal mad er pez a reann, ma n'edo ket va anaoudegez barfet gan-en, anter kousket e voann, n'em euz great nemet eur pec'hed veniel.

XIII. — PENAOL AR PEC'HED VENIEL A ZEU
DA VEZA PEC'HED MARVEL.

Ar pec'hed veniel, dreizhan he unan, a c'hell don da veza marvel e teir fesoun : 1^o abalamour ma z'eo faoz, dianket ar goustians, heb guelet e ma var ann hent fall, — 2^o abalamour d'ar goallskuer, — 3^o abalamour ma vez avechou disprijans evit al lezenn, pe evit an hini en deuz great al lezenn.

Meur a béc'hed veniel, dreizho ho unan, ne raint biken eur pec'hed marvel. Goulskoude, pec'hejou veniel a zo, hag a c'hell ober eur pec'hed marvel : egiz labourat e dog teir heur horolach, a nebeudou, a frappadou, brema eunn heur,

emberr eunn hanter-heur, divezatoc'h eunn hanter-heur all, da zul pe da c'houel berz. Ann oll tamouigou labourze ne reont, koulz lavaret, nemet eul labour, nemet eur memes pec'hed.

Pec'hejou veniel a c'hell c'hoas dont da veza marvel, hervez ann intansion a zo oc'h ober ar pec'hed veniel, evel ma z'eo : unan a laer pemzek lur digant neuz forz piou, ha kement-ze e seiz pe seiz tro. O laeret nebeut bep guech, mes, o kaout bepred ar zonj da zastum, evel-se, kalz guenneien da brema eunn dra, hag a zo enn he speret, peb laeronsi a zo bihan, veniel, evit doare; mes, ann intansion a ra, ouz ar pec'hed veniel-ze, eur pec'hed grevus, marvel.

XIV — PEDI ARAOK STAGA D'ANN EXAMIN
A GOUSTIANS.

Eur vech sklerijennet var ar pez a ra ed'ar pec'hed beza braz pe vihan, e rankomp diskenn e goueled hor c'haloun, furchat peb kogn tro. Mes, o veza ne c'hell ann den ober netra talvoudek d'he zilvidigez heb sikour Doue, goella zo, araog

ober ann enklask-ze, eo goulenn digann Doue ar sklerijenna vank deomp. Pedomp ar Verc'hez gloriüs Vari, hor mam benniget, hag honn eal mad d'hon skoazella. Rak, petra zervich klask traou enn eunn ti mar d'eo noz ha tenval enn ti ? Ne veler netra, ne gaver netra, pe diez braz eo kaout ar pezh a c'hoanteer. Labour fall ar rer atao. Araok eta stagua d'ann examin, svaomp hor spered varzu ann Env, ha pedomp ar Speret-Santel da sklerijenna a c'hanomp, evit ma c'hellimp gueletervad al loustoniou, a zo var ann ene ; ha dreze, ober dezhan eur c'hempenn mad. N'euz netra goelloc'h, eme Sant Ignas Loyola, evit chench buez, eget ober, benmdez ma c'heller, ann examin a goustians.

Ann examin a goustians a zo evel pemp lodenn ennhan : 1^o ar govessionou tremenet, 2^o gourc'hemennou Doue, 3^o gourc'hemennou ann Iliz, 4^o ar pec'hejou kapital, 5^o deveriou euz ho stad — setu hi ama, varlec'h.

EIL LODENN

EXAMIN A GOUSTIANS

I. — VAR AR GOVESSION.

HA c'hui hoc'h euz great mad ho kovessionou tremenet ? Marteze e zeuz bet enn-ho eur si, eur mank bennag, hag en deuz lakeat anezho da vezo heb frouez nul pe zakrilach, evel ma vezo bremaik displeget ha diskleriet dirazoc'h ?

Ha c'hui hoc'h euz resevet ann absolvenn,, heb gouzout mad ar mysteriou, ar re vrassa, ar re genta euz ar Feiz, pe c'hoas ho pedennou ? — hep anaout, herves ho kalloud, ann dispositionou a zo red evit reseo ervad ar zakramanchouma, ar Gonfirmation, ar Binijenn, Sakramant ann Aoter, ann Nouen ? — Kement absolven, hoc'h euz bet heb anaout ann traou-ze, a zo bet atao nul, hag aliez sakrilach.

Ha c'hui hoc'h euz kemeret, evit examina ho koustians, ann amzer zo red, ann evezded, ann aket, ar zourzi a lakiit peurlieissa enn hoc'h afferiou braz? — Dre faot kemeret ar zourzi-ze, ha c'hui zo manket da govez eur pec'hed marvel bennag?

Ha c'hui a zo kouezet enn defaot all a eneb beo da he-ma? — Hiniennou n'euz fin dezho d'en em examina, ha goude beza en em examinnet, keit ha keit all, e chomont atao nec'het gant aoun n'ho deffe ankounac'heat, dizonjet eur pec'hed bennag. Ann dra-ze a zo eunn defaot, eunn tech all. Rag, goudet beza lekeat ann amzer d'eread da glask ho fec'hejou, hag ar zourzi a gemerer peurlieissa evit ann afferiou, e tleont beza dineac'h, ha chom heb en em jala, heb lakaat ho fenn diez. Doue ne c'hourc'hemenn ket deomp diskleria ann oll bec'hejou on euz great, hag ankounac'heat. Ordrenn a ra deomp avad kovez ann oll bec'hejou marvel, on euz zonzj anezho, goude beza great hon exammin gant lealdet hag evezded.

Ha c'hui hoc'h euz tremenet lod euz amzer ann examin o klask troiou kam da

guzad pe da vihannaat ann niver hag ar grevusdet euz ho pec'hejou?

Ha chomet hoc'h-hu heb kemeret ar boan d'en em examina, abalamour ma kavjac'h eassoc'h e teufe hotad kovessour da c'houlenn diganeoc'h ar pec'hejou hoc'h euz great?

Ha c'hui hoc'h euz nac'het eur pec'hed marvel bennag, pe eur pec'hed veniel a zonzje deoc'h a voa marvel? — Great hoc'h euz neuze eur sakrilach, ha nikun euz ho pec'hejou n'eo bet pardounet deoc'h, dre ann abek-se.

Ha c'hui hoc'h euz diskleriet pec'hejou n'ho poa ket great, egiz ar re a sonje enn doare-ma : goelloc'h eo ganem, emezho, lavaret muioc'h eget nebeutoc'h? — Nan, nan, ne dleit ket diskleria pec'hejou n'hoc'h euz ket great. Eur gaou e ve dirak Doue ; ha n'eo ket mad. Lakaat a raffac'h ho kovessour da fazia, ha trompla a reffac'h anezhan.

Ha c'hui a zo manket da gaout lealdet er-govession, en eur vihannaat eur pec'hed marvel bennag, dre vez, dre aoun da veza gourdrouzet?

Ha c'hui hoc'h euz kovesseat eur pec'hed bennag, gant eur vouez ker goloet ha ken izel, ma ne c'helle ket ho kovessour gouzout petra a lavarac'h ? — neuze eo e doare pa n'ho pije ket kovesseat ar pec'hed-ze.

Ha c'hui hoc'h euz diskleriet ann niver euz ho pec'hejou marvel, pa ne ouiac'h ket ervad ? el leac'h lavaret evel-hen, tost da vad pe var dro, ne anavezann ket d'ar just ? Ha diskleriet hoc'h euz ar memes niver, be vec'h ma zeac'h da govez, evel o lavaret bep tro, n'hoc'h euz great, nemet diou vech, eur pec'hed marvel, ha c'hui o c'houzout mad, hoc'h euz great anezhan teir guez'h ? — kement-ze zo n'ac'h eur pec'hed marvel, hag ober eur zakrilac'h. Pa ne c'hellit ket anaout mad aoualc'h au niver euz ho pec'hejou, setu aman petra hoc'h euz da ober. Guelit ha c'hui a ra aliez ar pec'hed-ze, pe ne rit ket, mar d'eo bemdez, pe eur vech er zizun, pe eur verch er miz, epad kement-ma ha kement-ma a amzer. N'hoc'h euz neuze nemet lavaret : ann draze am euz great eur vech bemdez, eur vech ar zizun pe

ziou pe deir, eur vech pe ziou... vech er miz, epad eur bloaz pe.... bemp.... vloaz. Er giz-se e viot sklear ha freaz enn ho kovession.

Ha c'hui hoc'h euz kovesseat lod euz ho pec'hejou da eur c'hovessour all ? — Ar pec'hejou marvel ne c'hellont ket beza pardonnet ann eil bep eguile. Red eo diskleria anezho oll var eunn dro, pe d'ar memes kovessour.

Ha c'hui hoc'h euz ar c'hiz fall da jench aliez kovessour, da lavaret da unan, ar pec'hejou veniel, ha da unan all, ar pec'hejou marvel ; da redek euz ann eil gador-kovez d'ebenn, euz ann eil parrez d'ebenn ? kement-ze zo mad da lakaat ann dud difeiz da gaketal, da gomz a eneb a religion hag ar zakramanchou.

Ha c'hui hoc'h euz diskleriet petra voa ar pec'hejou great ganeoc'h ? — ha lavaret hoc'h euz a enep peseurt gourc'hemenn e voant ? — el leac'h lavaret evel lod a zo : « va zad, me, nam euz na lazet, na laeret. » Lavarit eta buhan petra hoc'h euz great ! evit-se eo, e zit da govez, ma hoc'h euz manket d'an offern, e lavaroc'h : « man-

ket ounn bet d'ann offern » Mar hoc'h euz tamallet unan bennag e gaou, e lavaroc'h : « tamallet a meuz bet va nessa e faoz. »

Ha c'hui hoc'h euz diskleriet ar zirkonstansou a jench ar pec'hed, en eur rei dezhan eur valis n'en doa ket drezhan he unan, evel ma ve laerez enn Iliz, pe traou ann Iliz ? al laeronsi-ze, ouspen ma eo eur pec'hed a enep ar seizved gourc'hemenn a Zoué, a ve c'hoas eur zakrilach braz pe vihan, hervez talvoudegez ann dra laeret. — Mad eo ivez diskleria ar zirkonstansou brassa ; evel ma z'eo ar zirkontans — 1^o euz ann amzer, egiz ma ve : mesvi da zul, da c'houel berz ; mankout d'ho pedennou, epad hirr amzer ; derc'hel kassouni, epad eur miz, epad eur bloas ; kaozeal, epad ar Gorreou enn Offern, — 2^o ar zirkontans euz ann dra : Laeret hoc'h euz ? livirit petra dal ar pez hoc'h euz goall-gemeret, ma n'eo ket arc'hant eo ? — ar zirkontans euz ann okasion dost ha dangerus, stad pe gondision ar pec'her m'hoc'h euz pec'hed ganthan. Lavarit hag her guelel a rit aliez. Injuriel, offanset hoc'h euz eunn

den ! Lavarit piou voa ; ha bez' voa ho tad, ho mam, ho paeron, ho maeronez ? Lavaret hoc'h euz komzou fall ha divodest dirak tud, tud yaouank, marteze zoken bugale ? Lavirit ha c'hui ho poa, da c'houde, ann intansion da ober ar pec'hed !

Laeret hoc'h euz arc'hant, eme c'hui ; hag evit mont da vesvi voa ? — Drouk-prezeget hoc'h euz, ha petra sonjac'h euz hen ober ? ha c'hoant ho poa evel se da lakaat ho nessa da goll he blas pe he vrud vad ? — Lavaret hoc'h euz gevier ? marteze evit kuzet ho troiou fall oa ? marteze evit ober gaou ousar re all oa ? Livirit-hen.

Ha c'hui hoc'h euz klasket en em zidamall, er govession, en eur lavaret : « ar re all a zo bet penn-kaoz d'inn. Anez ar re-ze, n'em bije biken sonjet ober kement all ! » Ne z'er ket da govez evit en em zidamall, evit en em exkuzi ; mes, evit en em varn, en em garga pe en em gomdaoni. Mezo hoc'h bet a livirit ; kerkent avad, e tiskleriit : « pa vezan mezo, me ne bec'hann ket ; me ne rann drouk da zen, mar d'ounn bet mezo, ez'eo divar va c'houst va unan ! » Digareziou didalvez !

Mezo hoc'h bet; ne glaskit ket a droidellou.

Ha chomet hoc'h bet heb diskleria eunn douetans a ioa enn ho spered ? ne vouiaç'h ket hag ar pezh poa great, pa voac'h yaouankik, a zo eur pec'hed marvel ! Livirit-hen-ta d'ho kovessour. Ne vouezit ket ha c'hui hoc'h euz kovesseat eur pec'hed hag hoc'h sur da veza great ! diskleriit anezhan.

Ha c'hui hoc'h euz diskleriet ar pec'hejou ho poa aliet ar re all da ober ? pe ordrenet dezho ober ? Ar bed a zo, siouas ! leun a dud a guzul fall !

Ha c'hui hoc'h euz hanvet, en eur govez, ann dud a ioa bet o rei deoc'h ann dourn, e sikour ac'hanoc'h da ober drouk, da offansi Doue ? Arabad eo morse hen ober, nemet red e ve deoc'h her rei da anaout. Evessait mad e ma pep hini gant-han he unan er gador-kovez, ha difennet eo diskuill pec'hejou ho nessa.

Ha c'hui hoc'h euz diskleriet ar pec'hejou great ganeoc'h dre zonzou pe dre zezirou ? kalz tud ne govessaont ket ar pec'hejou-ze, abalamour ne reont ket mad ho examin, pe abalamour ma kredont

beza direbech dirak Doue, pa n'ho d'euz ket great ar pec'hed dre oberou, pe es-sea hen ober. En eur govez ho pec'hejou dre sonjou pe dre zezirou, ha diskleriet hoc'h euz, pe goulz, peur ha peb guech ez'hoc'h kouezet enno, express mad, a volonteiz vad, gant plijadur ha gouiziegez ? Mar hoc'h euz pelleat anezho raktal, distroet ho spered da zonzal e traou all, n'ho pezo ket bet a bec'hed.

Ha c'hui hoc'h euz diskleriet ho pec'hejou heb glac'har, o kredi a z'oa traoualc'h kovez ar pec'hejou, evit beza pardounet gant Doue ? — Ha c'hui hoc'h euz bet, enn ho kalon, eur c'hlaç'har dreist natur, er guel euz a eunn Doue madelezuz ; er guel euz a Jesus, stag ouz ar groas, ho poa offanzet dre ar pec'hed ; er guel, pe er zonz c'hoas euz ar Barados ho poa kollet, hag euz ann Ifern ho poa meritet, evel ma vezo diskuezet deoc'h aman varlec'h ? — Ho keuz hag ho klac'har, hag en em astenn a reant var ann oll pec'hejou marvel, hoc'h euz kavet, oc'h ober hoc'h examin ? — Gant skoazel, sikour, nerz grass Doue ha sonjal a reac'h, a zevri, da

zilezet anezho, da zivouall outho, goudeze? — Pa z'hoc'h bet o kovez ha chenchet hoc'h euz-hu buez? ha kuiteat hoc'h bet ann okasion dost d'ar pec'hed marvel, ma z'oac'h kouezet ennhan? Mar do'ch bet kouezet ken buhan ha diagent? Mar d'hoc'h eat var voassat bepret? Riskl, danger braz z'ho, n'ho peffe ket great ar govessionou mad, abalamour n'ho poa ket a geuz d'ho pec'hejou, o kovez anezho. — Ha c'hui hoc'h euz goulennet ar gontrision digant ann Aotrou Doue, dre eur bedenn kalounek, great goude, hoc'h examin, hag abars mont er gador-kovez? Red eo poania da gaout keuz, araok kovez. N'eo ket mad gortoz ar poent, ma roio ar belek deoc'h ann absolvenn.

Ha c'hui hoc'h euz manket, dre leziregez, da ober ar binijenn, roet deoc'h gant ho kovessour? — Ma n'ho poa ket a sonj, en eur reseo ann absolvenn, da ober pinijenn evit eur pec'hed marvel, neuze ho kovession ne dalie netra, neuze hoc'h euz great eur zakrilach. Mar ho poa intansion da ober ho pinijenn, ha ma n'hoc'h euz manket d'ho pinijenn nemet

dre leziregez, ho pec'hed zo braz pe vihan, hervez ma z'eo braz pe vihan ho pinijenn, ar pec'hejou ho poa diskleriet. Da bephini ober ar pinijenn roet. Ne c'heller ket karga tud alleuz argement-se.

Ha c'hui hoc'h euz chenchet ho pinijenn, abalamour ma kavac'h anezhi re boanius, re hirr, re ziez da ober? — Ha c'hui a zo chomet re bell amzer heb ober ho pinijenn? ar pezh a c'hell beza kaoz deoc'h da zont d'hen ankounac'haat var neat, pe zoken da vervel heb beza her peurechuet? — Ha c'hui hoc'h euz great ho pinijenn, en amzer merket deoc'h gant hor tad kovessour? — Ha great hoc'h euz kement a voa gourc'hemennet deoc'h, pe lod hebken euz ho pinijenn? — Ha great hoc'h euz anezhi gant devosion?

Ha c'hui hoc'h euz great ho kovessionou gant lealdet? — Ma velit eur si, eunn defaot, eur mank bennag enn ho kovessionou tremenet, pe abalamour m'hoc'h euz nac'het eur pec'hed marvel bennag, pe abalamour n'hoc'h euz morse ar c'hlaç'har a zo red d'ho pec'hejou, ha ma ne felle ket deoc'h chench buez, e

c'hellit anaout, dre gement-ze, e z'eo bet nul ho kovessionou, hag e rankit ober anez-ho a nevez.

Ma c'hoantait hoc'h unan ober eur govession general, lavarit d'ho tad kovessour petra zo oc'h ober poan d'ho spered, hag e viot sklerijennet. Mes, ar-raok ober ho kovession general, grit atao ho kovession abaoe ma z'hoc'h bet da ziveza o kovez.

Mes, mar hoc'h euz sonj ha mar hoc'h euz bet digant ho tad kovessour kounje da ober eurgovession jeneral, sonjite peseurt plasou hoc'h bet, peseurt tud hoc'h euz darempredet, peseurt affer, peseurt labour hoc'h euz da ober. Kement-ze ho sikouro da gaout sonj euz ho pec'hejou. Neuze, goude beza great eur beden, evit goulenn sklerijenn ann Aotrou Doue, guelit petra lavar deoc'h ho goustians, hag en em examinait mad var gourc'hemennou Doue ha re ann Iliz, var ar seiz pec'hed kapital, var deveriou ar stad, ma vevit pe hoc'h euz bevet ennhan, hervez ma z'eo merket deoc'h sklear aman varlerc'h.

II. — VAR GOURC'HEMENNOU DOUE.



KENTA GOURC'HEMENN

Eunn Doue hebken a adori.
Ha dreist pep tra oll a gari.

DRE ar gourc'hemenn kenta, Doue a Dordrenn deomp kredi ennhan, esperout ennhan, he garet, hen adori, lia kement-ze a reomp en eur heulia ar peder vertus-ma : ar Feiz, ann Esperans, ar Garantez, ar vertus a Relijion.

1^o Var AR FEIZ. — Ha c'hui a zo manket da zeski ar guirionezou kenta euz ar Feiz, a rank peb kristen mad anaout evit beza salvet, evel ma z'eo ; myster ann Dreindet, myster ann Inkarnation, myster ar Redempcion ? Piou a ielo d'ar Barados ? Piou a ielo d'ann Ifern ?

Ha gouzout a rit-hu e brezounek ar Bater, ann Ave Maria, ar Gredo, ar Gonsiteor, ann Aktou, Gourc'hemennou Doue ha re ann Iliz ? — Hag anaout a rit-hu ar Zakramanchou a resevit, hag ar pez a zo red evit ho reseo ervad ? Piou

bennag, ne oar ket ann traou-ze, ne verit ket ann absolvenn. — Ha c'hui zo manket da zeski, pe hoc'h unan pe dre re all, ann traou-ze d'ho pugale ha d'ho serviche-rien ? — Ha c'hui a zo bet lezirek da gass ho pugale d'ar c'hatekismou, da skol ann Iliz, var zigarez m'ho poa izom anezho, er gear, da labourat ?

Ha c'hui a zo bet manket da gredi eur virionez bennag, desket deoc'h gant ann Iliz ? pe bet douetans var ar guirionezou-ze ? — ha c'hui a zo chomet express da zonzal evel-hen : marteze, n'euz Ifern ebet ; marteze, poaniou ann Ifern ne badin ket da vikenn ; marteze, hor Zalver Jesus-Krist ne ma ket e Sakramant ann Aoter ? hag chomet hoc'h da zonzal enn douetansou-ze, aliez, a volontez vab, hag epad hirr amzer ?

Ha c'hui hoc'h euz bet mez oc'h anzao, dirag ann dud all, oac'h kristen stard enn ho teveriou ? mes oc'h ober sin ar groas ? mez o lavaret ho pedennou ? mez oc'h ober eunn dra bennag, gourc'hemennet gant lezenn Doue pe lezennou ann Iliz ? — Ha c'hui a zo manket da

zerra ho ginou d'ar re a glevac'h o tikrial ar Relijion, ann dud konsakret da Zoue, ispecial ma ho poa guir, autorite var ann dud a gomze er giz-se, pe ma oac'h kossoc'h evit-ho ? — ha c'hui hoc'h euz c'hoarzet o klevet ober goap euz ar Relijion, o klevet farserien difeiz ? — ha c'hui hoc'h euz darempredet tud direspert, hag a c'helle noazout d'ho Feiz, dre ho goall gomzou ? — ha c'hui hoc'h euz lennet pe klevet lenn livriou pe gazetennou a enep ar feiz, kanet pe silaouet kana soniou leun a farserez, a c'hoaperez evit ar Relijion hag he beleien ?

Ha c'hui hoc'h euz, evit ar voterez, roet ho moues da dud a ouiac'h ervad a ioa pe enebourien touet, pe enebourien, enn eur c'hiz bennag, d'ann Iliz Katolik ? ha kovesseat hoc'h euz ar pec'hed-se ? — Henvel tud da gass ann traou enn dro pe er vro, pe enn departamant, pe er barrez, a zo eunn dra a bouez, eunn dra talvoudus dreiz-hi he unan, hag a denn da galz a zrong pe da eur vad dispar. Rak, diouz ann dud a zo dibabet, e ielo mad pe fall ann traou evit ar vro, ar barrez, koulz hag

evit ar Feiz, ar Relijion hag ann urz vad. Ma hoc'h euz eta roet ho mouez da dud a ouiac'h ervad a ioa enebourien d'ann Iliz, hoc'h eat, dreze, a enep ho Feiz, ho koustians ! Guêrzet hoc'h euz hor Mam Zantel ann Iliz, koulz lavaret, evel guechall Judas en deuz guêrzet he vestr divin d'he enebourien, hag evit petra ? evit tregont pe z arc'hant. — Marteze, c'hui ivez n'hoc'h euz ket great a stad aoualc'h ouz ar votêrez, pe o chom heb voti, pe o voti evit tud digristen, tano ho Feiz, ha kement-se evit eur banne, peevit eunn dra all dister, pe zoken abalamour ma voant keren deoc'h ? — Eur c'houlm a zo eaz da ober ; oc'h her freuza, pa vez stard, e koller kalz poan ha kalz amzêr, avechou zoken red eo terri, pe drouc'ha.

2^o Var ANN ESPERANS. — Ha c'hui hoc'h euz -dizesperet euz ho zilvidigez, o sonjal ne bardoun-je biken Doue pec'hejou, evel ar re hoc'h euz great ? o kredi ne c'helloc'h ket terri ho koall boazaman-chou, na trec'hi ann dentasion gant nerz grass Doue ? — Enn difizians-ze, ha c'hui zo eat betek fall-galouni ? — ha c'hui

hoc'h euz bet dilezet ar beden, ar Zakramanchou, en eur zonjal e kollac'h ho poan, o pedi Doue, pe o kredi ne vijac'h ket silaouet ? — Ped guech hoc'h euz great kement-se ?

Ha c'hui hoc'h euz kemeret re a nea-c'hamant, grosmolet, murmuret a enep ar Brovidans, pa vijac'h klanv, pa zantjac'h ho nerz o vont kuit diganeoc'h, pa c'hoarveze ganeoc'h eur boan, eur c'holl, pa velac'h ho pugale, ho famill, o kreski ? Manket hoc'h euz dre-ze a fizians e madelez, e Providans ann Aoutrou Doue !

Ha c'hui hoc'h euz fiziet re var ho furnez, var ho nerz, en em lakeat enn okazion vraz da goueza er pec'hed, evel ann dud yaouank a red d'ann dansou, a veler enn oll daremprejou, enn oll ebatou ar bed, hag a chom re zivezat, re bardaez, ennho !

Goude beza great eur pec'hed marvel bennag, ha c'hui hoc'h euz her great a-darre, o sonjal ho pije ker buhan ann absolvenn hag ar vec'h kenta ? o kredi e resejac'h ker buhan ar pardoun euz a veur a bec'hed hag euz a unan ? Ma eo ann Aoutrou Doue madelezes, just eo ivez. —

N'hoc'h euz-c'hui ket kountet re var ho silvidigez? — Chomet pell amzer er pe-c'hed marvel? ar merkl, pa jom var ann dir, a zebr ann danvez ar goella. — Ha pelleat hoc'h euz, daleet, gedet ho kozni, pe heur ho maro, evit chench buez?

3^o Var AR GARANTEZ. — Ha c'hui hoc'h euz karet eun dra bennag muioc'h eget Doue, o veza goell ganeoc'h hen offansi kentoc'h eget gouzanv eur c'holl, pe zisprijans, pe c'hoaperez ann dud?

Ha c'hui hoc'h euz great hoc'h oberou mad, hervez ho penn hoc'h-unan, ho froudenn hag ho faltazi? pe evit plijout d'ann dud, eleac'h poania da ober peb tra evit senti ouz ann Aoutrou Doue, evit he vrassa c'hloar ha dre garantez evinthan? Heulia ha poania da heulia a boent da boent al lezenn gristen, setu ar merk euz a vir garantez evit ann Aoutrou Doue.

Ha karet hoc'h euz ho nessa abalamour da Zoue? karet ann Aoutrou Doue heb karet ann nessa a zo digarezi. — Ha karet hoc'h euz ann nessa evelhoc'h hoc'h unan, da lavaret eo, oc'h ober dezhan ar pezh e karc'h a vije great

deoc'h pe o chom heb ober dezhan ar pezh ne garfac'h ket a vije great deoc'h hoc'h unan? Diez braz eo avechou karet ann nessa pe abalamour d'ar boan, d'ar gaou en deuz great ouzomp, pe abalamour d'he zefautou. Ar garantez gristen a zo diazezet var ar feiz, hag ar feiz a ziskuez deomp enn nessa, daoust d'ar boan en deuz great deomp pe d'he zefautou, eunn ene krouet gant ann Aoutrou Doue hervez he batrom hag he henvelidigez. Ar vertuz a garantez ne lavar ket deomp karet ar pezh a zo da veza kasseet enn nessa, mes karet labour ann Aoutrou Doue, ann ene. Daoust ma z'eo eur berlezenn goloet gant ar pri, chom a ra perlezenn atao. — Ha pardounet hoc'h euz d'ho nessa? ha komzet hoc'h euz ounthan? ha diskuezet hoc'h euz n'ho peca ket a zrouk ounthan?

4^o Var AR VERTUS A RELIJION. — Ha c'hui hoc'h euz douetet, pe lavaret, pe sonjet evel-hen : avoualc'h eo beza eunn den honest evit beza salvet? Pe c'hoas : Doue a anavez hon ezomou, ha n'on euz ket a leac'h da bedi anezhan?

Ha chomet hoc'h, epad pell amzer, heb pedi Doue? Ha c'hui a zo manket da lavaret ho pater, ho pedennou diouz ann noz ha diouz ar mintin? Ped guech ar zizun, ped guech er miz? — Ha n'hoc'h euz c'hui ket lavaret ar grassou, diouz ann noz, re vuhan gant mall da vont d'ho kuele, pe en eur vorgousket, pe en eur gaoseal euz a re all, pe en eur c'hoarzin? — Ha c'hui a zo kustum da ober eur bedenn bennag, araog ha goude ar pred, da drugarekaat Doue, a ro ar pred-se deoc'h? — Ha c'hui a zo bet manket da lakaat ho pugale, ho servicherien da bedi? — Ha c'hui a lez gantho ann amzer a zo red, evid eunn dever ken braz? ha kendalc'het hoc'h euz, pennou tiegez, da gen-pedi, da lavaret ar bedennou e komm, dioc'h ar mintin ha dioc'h ann noz? — Ann Aoutrou Doue a zo mestr var pephini ac'hanomp, koulz ha var eunn tiegeziad pe eur vroiad tud a bez. Rakse ta ar bedenn komm a dle beza lavaret enn eunn tiegez kristen evel enn eur vro gristen. Ouspenn-ze hor Zalver J.-K. en deuz diskleriet e vezo etouez daou pe dri

en em zastumet evit ober ho fedenn.

Ha devot hoc'h d'ar Verc'hez. Hor Mamm eo. Ma hoc'h devot d'ar Verc'hez a zo leac'h da gredi e vezoc'h salvet. Mes goall gomz a eneb ar Verc'hez a zo enr merk a zaonation. — Hag enoret hoc'h euz imaj ar Verc'hez, imaj ar Zent. Pa garer unan bennag, e karer sellet ouz he imaj, he respecti. — Ha douget hoc'h euz relegou ar Zent gant respect ! Re aliez, siouas ! e vanker a respect dezho. Ar relegou a zo goulsgoude eul lodenn euz korfou ar Zent; hag ar c'horfou-ze a zo bet memprou beo hor Zalver J.-K., ha templou ar Spered Santel. Pa zavo ann dud euz a varo da veo, da fin ar bed, ar c'horfou santel-ze a vezo goloet a c'hloar gant ann Aoutrou Doue. En eur enori imachou, relegou ar Zent, e enoromp ar Zent ho unan.

Ha great hoc'h euz goap euz ar re a zo er breuriezou, evel breuriez ar Rosera, ar Skapulair, breuriez Propagation ar Feiz, Abostolach ar bedenn, ann Adoration, goap euz ar re ho deuz roet evit diner Sant Perr, kest ar Seminair,

offranson d'ar Zent, d'ann Iliz, o lavaret ne voant, ne vijent ket goelloc'h eget ar re all ? — ha great hoc'h euz goap euz ar re a ia, bep ann amzer, da govez ha da gommunia, o tistrei, evel-se, diouzeur vuez kristen ha reoliet, mad, ar re a silaou-fe ho komzou briz ?

Penaos hoc'h antreet enn Iliz, marteze en eur kaozeal, en eur c'hoarzin ? Ann Iliz a zo ti ann Aoutrou Doue. Diskuezit eta doujans ha respet. Hor Zalver J.-C. a zo eno enn Tabernakl. — Ha bet hoc'h dibarfet enn Iliz, o sellet enn dro d'eoc'h evit guelet piou a ie hag piou a deue, o kaozeal zoken a vouez huel evel a raffe eur paian, eunn den difeiz ? — Ha tremenet hoc'h ebious da eunn Iliz, da eur Groas heb tenna ho tog hag heb ober sin ar groas ? — Ha noc'h euz ket manket a respet d'ann traou benniget gant ann Iliz, evel ann dour benniget, ar goulou benniget, ar bara benniget, ar verred, ar groas, ar veleien, ann n'Eskop, ar Pab ? — ha n'hoc'h euz ket implijet ann traou benniget, dre eur gredenn faoz, o devoa anezho ho-unan nerz ha ver-

tus avoualc'h, implijet anezho da ober louzeier, medisineres evit ann dud pe ann anevaled ? — ha ne d'hoc'h ket bet o kaout tud hanvet sorserien, divinerien, evit klenvejou, evit kaout traou kollet pe laeret ? evit anaout pe zeski ho *Ponavantur*, pe hoc'h amzer da zont ? Ar superstisionou-ze, ha kalz a re all, a zo a eneb ar vertus a Relijion, hag a zo eur mank a sklerijenn hag a dleit da ziskleria, ma hoc'h euz bet fizians enno.

EIL GOURC'HEMENN.

E vean he hano na doui ket
Nag ivez netra all ebet.

HA n'hoc'h euz c'hui ket kemeret hano Doue e vean, o toui avechou var ar gaout, o lavaret komzou, evel ar re-man : Doue her goar ! Doue a zo test ! ken guir ha ma z'euz eunn Doue ! Petra am euz great da Zoue ? Doue neo ket just ?

Ha ne daolit ket ann hano a Zoue, enn ho koler, ouz kement tra a zeu da hegal ouzoc'h, bugale, servicherien, loanet ? — Lakaat ar ger sakre dirag hano ann Aoutrou Doue a zo drouk komz outhan.

Ha great hoc'h euz goall bedennou varnhoc'h hoc'h unan, pe var ar re-all, er c'hiz-ma : Me garfe beza dall, beza maro, beza daonet, ha komzou all evel-se ? — Tadou ha mammou, ha great hoc'h euz drouk-pedennou var ho pugale, pa ne zentont ket ouzoc'h ? taolit evez mad gant aoun ma teuffe da vir ho koal pedenn,

Ha c'hui hoc'h euz touet ober eunn dra difennet ? Lavarit pe seurt droug hoc'h euz touet da ober ? ha ma hoc'h euz dal-c'het d'ho ker ? — ha c'hui hoc'h euz touet ober eunn dra ha n'ho poa ket sonj da ober ? ann dra-ze a zo ober eur le-faoz. — Pa zoc'h bet galvet da doui e Justis, ha lavaret hoc'h euz ar virionez, hag ar virionez penn da benn, ha netra nemet ar virionez ?

Ha chomet hoc'h bet, hep seveni, pe heb miret ar promessaou ho poa great da Zoue ? evel darn euz ann dud a zo buhan da brometti pa vezont klanv, ha ne reont netra, pa vezont pare. Ar goella atao, araog ober veu, eo goulenn kuzall digant ho tad kovessour. — Ma kav deoc'h e vije mad iun, pe ober eunn

dra all, hep goulskoude prometti d'ann Aotrou Doue, dindan boan a bec'hed, n'euz ket a veu. Kemm a zo etre ober veu hag ober he sonj, pe lakaat eunn dra bennag enn ho spered.

Ha refuset hoc'h euz rei d'ann Iliz, pe d'ar beorien, ar pez ho doa ho tad pe ho mamm promettet dirazoc'h, araok mervel ?

TREDE GOUARCHEMENN.

Ar Zaliou zantel a viri.

E servich Doue, ouz he veuli.

TA labouret hoc'h euz da zull, pe da c'houel berz, evel ma z'eo : charreat, medi pe zestum ed epad ann eost, trouc'ha pe zestum boued d'ar chatal, griat, neza, ribotal, tamouezat, spura ann arrebeuri..... ? Epad pegeit amzer hoc'h euz labouret evel-se, heb ma vije bet red deoc'h ? Mar hoc'h euz labouret epad diou pe deir heur dioc'h-tu, pe a bennadou zoken ? pe labouret a vel d'ann oll, evel-se, roet goall skuer, e vezo red deoc'h he! lavaret. — Ha lakeat hoc'h euz tud ho ti, ho servicherien, ho tevezierien, da labourat deoc'h da zul ?

Al labour da zul a gass ann den da baour buhan aoualc'h. Ezomm on euz dreist peb tra euz a vennoz ann Aotrou Doue. Ar zul a zo da Zoue. Dies Dominica. Ne zi ket eta da laerez ann Aotrou Doue. — Beza zo labouriou, daoust ma en deuz ar c'horf muioc'h a berzennho eged ar spered, ha n'int ket goulskoude difennet da zul, evel ma zeo ; prena pe verza pe a dra da zribi, aoza ar boued, kempenn ann tiez, a renka ann Ilizou egiz ma tleont beza evit ann offisou, bolea ar c'hleier... Beza zo labouriou all hag a lezer ober, petra bennag m'int difennet dreizho ho unan, evel ma z'eo : guerza d'ann dud divar ar meaz marc'hadourez ha ne ve ket eaz dezho ho frena enn deizioù all. — Evelato goelloc'h e vije d'ann dud divar ar meaz gortoz eunn dervez var ar pemdez evit prena dillad ha traou all. — Erfin ober a c'heller al labourion a zo difennet da zul, pa vez red, evel ma z'eo : evit moug a ann tan goall pe ziarbenn ann dour-beuz pe eur goall-eur all bennag, pa n'he deuz ann dud paour nemet ann deiz-se evit dressa ho dillad, ha pa vez ann eost eriski

da vont da goll abalamour d'ann amzer fall. Mes ma tle al labour beza great a vel d'ann oll, e renker goulenn kounje digant ann Aotrou'n Escop, pe digant ann Aotrou Persou ; ha pa ne dlefe ket zoken al labour beza great o vel d'ann oll. eo mad goulenn kounje er memes tra, gant aoun na deufe da fazia o sonjal e ve red labourat da zul d'ann ampoent ne ve ket.

C'hui, hostizien, ha roet hoc'h euz da eva da dud ho parrez, epad ann offis, o veza kaoz dezho, ma vankent d'ho dever, d'ann offern ha d'ar gousperou ?

Ha tremenet hoc'h euz eunn amzer vraz euz ar zul, enn hostalirion, er c'hoariou, er goall gompagnunezou ?

Pa z'oc'h bet manket d'ann offern, dre eur rezoun vad bennag, dre ma z'oac'h klanv, pe chomet da entent ouz tud klauv, fall, toc'hor, grit eur bedenn bennag er gear epad ann offis, mar d'eo eaz deoc'h hen ober. Mes ne kemerit ket evit eur rezoun vad ar pezh n'eo nemet eunn digarez, evel ma z'eo : mont da velet ho tud, kass loenet pe chatal

enn tu bennag, pe c'hoas zoken ma n'eo ket red chom da entent ouz tud, n'int ket goall glanv.

Ha kirriek hoc'h bet d'ho pugale, d'ho servicherien da vankout d'ann Offern, d'ar Gousperou, o terc'hel anezho da labourat, da ziuall ho loened ? — Ma n'eo ket eunn dever striz evidomp mont d'ar Gousperou evel mont d'ann Offern ; goulskoude eunn dever eo evit peb kristen santifia ar Zul, penn da benn, goude lein koulz hag euz ar mintin, ha pa ne zer ket d'ar Gousperou, chom a rer da c'hoari, da gemer ar plijadur enn eur c'hiz bennag, ha ne zonzjer tam enn Aotrou Doue dioc'h ar pardaez. N'eo ket a ze, a dra zur, santifia ar Zul penn da benn. — Ha n'hoc'h ket bet re zivezat enn Offern, dre ho faot ? — Penaoz hoc'h euz en em zalc'het, en em gomportet, enn Iliz, epad ann Offern ? — ho spered n'edo ket marteze o sonjal enn Offern ? — Sellet hoc'h euz enn dro deoc'h, kaozeal, c'hoarzin ha lakaat ar re all da c'hoarzin, mont en Iliz, pe zont er meaz anezhi, gant freuz ? — Eat hoc'h marteze

d'ann Offern plean, d'ann Offern vintin, aliessoc'h eget ho tro, ha chomet pell amzer heb klevet ann instruksionou great epad ann Offern bred ?

PEVARE GOURC'HEMENN.

Da dad da vam a enori,
Evit pell amzer ma evi.

⦿'pi, bugale ha tud yaouank, ha c'hui zo manket da zenti ouz ho tud, pa c'hourc'hemennent deoc'h eun dra bennag just, hervez Doue, ha ne voa ket dreist ho kalloud ? — ha sentet hoc'h euz ouz ho tud, gant eunn ear drouk-kountant, eu eur c'hrosmolat ? — ha kustum hoc'h da rezouni ouz ho tud ? — hag eat hoc'h, enn despet dezho, d'ar foariou, d'an assembleou, d'ann hostalirioù, pe d'ann tiez all, enn noz ? hag heuliet hoc'h euz kompagnunezou hac a ioa difennet ouzoc'h da zarempred ? — ha disprijans ho c'heuz bet evit ho tad, evit ho mamm ? hag hen diskuezet dezho, dre gomzou rust, dichek, direspet ha divergount, evel ar re-man ; Roit peoc'h... terri a rit va fenn dinn... na ouzoc'h ket

petra a livirit... ann hini koz... ha kalz a gomzou all, evel-se, hag a zo eur rann-galoun evit eunn tad hag eur vamm? — ha c'hui a z'ho bet e koler outho? Lakeat anezho da facha, da be-c'hi, da vouela abalamour d'ar c'hlac'har a reac'h dezho? — ha c'hui hoc'h euz bñntet anezho, pe skoet gantho, pe savet ho tourn d'ho skei? — ha goapeat hoc'h euz anezho, diskuliet ho defaoutou dirag ann dud all? — ha manket hoc'h bet da vaga ho tad hag ho mamm, enn oad hag enn eaz d'he ober? — ha kemeret hoc'h euz soursi anezho, pa z'oant klanv, ha lakaat rei dezho, hervez ho kalloud, ar medisn hag al louzeir, ar remejou a raffe vad dezho? — ha refuset hoc'h euz ho soulaji, var digarez n'oac'h ket muioc'h oblijet eget ho preudeur, hag ho c'hoarezet-all? — ha manket hoc'h euz da assista ho tad hag ho mamm enn ho ezomou spirituel? d'ho reprenn gant douster ha karantez euz ho defaoutou, pa voant lezirek var boent ho silvidigez, pe pa z'oant mezo, pe pa ne zeant ket da góvez? — Pa vont klanv, ha roet hoc'h euz dezho da

anaout e voa danjer, e voa poent gervel eur beleg, ha poent reseo ar zakramanchou diveza? — Goude ho maro, ha son-jet hoc'h euz pedi, ha lakaat pedi evit ho tad hag ho mamm hervez ho kalloud? ene ho tad pe ene ho mamm a zo bremau marteze e tan ar burgator abalamour deoc'h.

Ha c'houi priejou, ha bevet hoc'h euz, etrez'hoch, evel priejou kristen? Sakramant ar briadelez a c'houlenn ar brassa respet. Eunn ti, savet var ann treaz, a gouez buhan enn he boull. Ann disterra tourmant a laka anezhan da eja. Setu perag e klasker ar roc'h pe ar c'haled pa zaver eunn ti. Ar roc'h eo ar garantez gristen; hag ar garantez gristen a zo diazezet var ar Feiz, var ar respet, ha var ann oberou mad. Egizal ar garantez ne bad ket etre ar priejou.

Ha c'hui, tadou ha mammou, ha beillet hoc'h euz, gant aket ha karantez, var ar c'hrouadur, roet deoc'h gant ann Aotrou Doue? — great goall vloavez dre ho faot? — ha lakeat hoc'h euz badezi ho krouadur, da vihana, dindan tri dervez? —

ha c'hui hoc'h euz lakeat ho pugale ga-
neoc'h da gousket, abars m'ho devoa
bloaz ? — ha refuset hoc'h euz, dre ava-
risded, dillad dezho, hervez ho c'hondi-
sion, hag ar remejou, a voa red, enn ho
c'hlenvejou ? — ha droug hoc'h euz bet
euz ho pugale, betek goall gass anezho,
goall skei gantho, hep digarez, pe abeg
vad ebed ? desiret ho maro dezho ? — ha
c'hui a zo manket d'ho reprenn, d'ho
c'horrija pa reant eunn drouk bennag, pa
lavarent gevier, pa glevac'h anezho o
lavaret sakreou, komzou fall, louz ? —
Bazata, skandala, goall gaozeal ouz ar
vugale aliez, a zo lakaat anezho da veza
pennok enn ho santimant. Kaledi a reont.
Goeloc'h eo korrija anezho eur vech pe
diou vech evit mad, neuze e talc'hint
sonj, hag e plegint deoc'h. N'euz netra
koulz evit ar vugale eget skuer vad enn
ti ? — na rit-hu ket, heb resoun, mui-
oc'h a stad euz ann eil pe egile d'euz ho
pugale, o lakaat ar re all d'a gemeret ja-
louzi ? — Ha roet hoc'h euz d'ho pugale
eunn deskadurez vad, ha desket dezho ho
fedennou, ho c'hatekismou, he c'hrean-

sou, kerkent ha ma voant enn oad d'ho
deski, hag heb gortos ar bloas ma raint ho
fask kenta ? — ha n'hoc'h euz ket kasset
ho pugale da skoliou dizoue, pa ho poa
skoliou kristen enn ho parrez, pe ar
c'halloud d'ho c'hass d'al leac'h all ? —
Hon Tad Santel ar Pap a ziskler : n'int
ket dibee'h eunn tad hag eur vamm ha ne
gassont ket ho bugale d'ar skoliou kris-
ten. — Ha c'hui a zo manket da gass a-
nezho da govez, da skol ann Ilis ? — ha
c'hui hoc'h euz lakeat ho pugale abred da
labourat ? — ha c'hui hoc'h euz desket dez-
ho eur vicher bennag, evit ma c'hellint
gounit ho zamm bara, el leac'h ho lezel
da c'haloupat ann hentchou, ha deski
ann drouk evel-se, orchom atao didalvez
ha dilabour ? — ha lezet hoc'h euz re a
liberte gant-ho, da vont d'ar soariou, d'ar
pardouniou, d'al leuriou nevez ha d'ann
hostaleriou ? — ha roet hoc'h euz dezho
kalz arc'hant, ha roet tro dezho, egiz-se,
da ober goall zispign ? — ha c'hui hoc'h
euz lezet ho pugale hag ho servicherien,
heb en em lakaat e poan da c'houzout pe-
tra reont na da beleac'h e z'eont, enn noz

hag enn deiz ? — Ha roet hoc'h euz goall skuer dezho, o tont mezo d'ar gear ? dre ho leziregez hoc'h-unan da bedi Doue, da assista enn offern, er Gousperou, da zantifia ar zul, da dostaat ouz ar zakramanchou ? — Dre hoc'h akustumans fall da doui ha da zakreal, ha n'hoc'h euz-hu ket goall skueriet anezho ? — ha dalc'het hoc'h euz tud a voall vuez, a gomportamant fall, enn ho ti, dre avariseded, abalamour ma labourent mad evidoc'h, e riskl da goll ar re all, evel-se ? — Tadou ha mammou ha losket hoc'h euz ho paotret yaouank, ho merc'hed yaouank, pa voant e sonj da zimezi, da veza re hardis etrezho, hep rei ali, kuzul ebet dezho ? — ha fortuniet hoc'h euz anezho, a eneb ho zantimant, da dud ha n'ho d'oa ken merit nemet ho danvez, heb sonjal e tleit klask, da genta, tud fur hag a c'houar-vad ?

Ha c'hui, servicherien, ha malis hoc'h euz bet ouz ho mestr pe ho mestrez ? — great goap anezho ? — great fae var ar pez a lavaret deoc'h ? — a c'hui a zo en em goleret ouz ho mistri ? — ha lavaret hoc'h euz langach dezho ? — great goall beden-

nou varnezhio ? — bet kaoz dezho da facha ? — halavaret, diskuiliet hoc'h euz, er meaz euz an ti, ar pez a dlee chom sekret ha kuzet enn-han ? — ha refuzet hoc'h euz senti out-ho, e traou just, pe sentet en eur vurmuri, en eur voall respount ? — ha sentet hoc'h euz outho, pa ordrenent deoc'h traou a enep lezeunn Doue, evel pa lavarent deoc'h labourat da zul hep rezoun vad ebet, pe ober eunn dra bennag hag a vire ouzoc'h da vont d'ann offern, pe draou all ? — ha kollet hoc'h euz hoc'h amzer, o chom da feneanti, pa ne veze ket o mestri ganeoc'h er parkeier, pe el leac'h all ? — ha lakeat hoc'h euz re all da goll ann amzer ganeoc'h ? — ha distroet hoc'h euz eunn dra bennak divar goust ho mestr, evel ed, bleud, amann, kig, evidoc'h hoc'h-unan, pe evit ar re all, hag e vijent paour, heb gouzout dare d'ho mestr pe d'ho mestrez, var digarez avechou ma n'ho poa ket avoualc'h a goumanant ? — ha chom a rit enn eunn ti a voall skuer, el leac'h kuitaat ar c'henta ma c'hejjac'h ? — ha torret hoc'h euz ho ploaz, heb kaout

leac'h d'hen ober ?

Ha c'hui, mistri, ha re rust hoc'h bet ou hoservicherien?—ha roet hoc'h euz dezho labour hervez ho nerz, boued hervez ho labour, ho oad, ho c'hondision?—ha sour-sihoc'h euz bet anezho, enn hoc'h lenvejou? — ha taolet hoc'h euz evez varnezho, evit miret outho mont d'ann hostaliri, da redet epad ann noz, da heul goal kompagnunez?—ha great hoc'h euz dezho heulia ho deveriou kristen, mont d'ann offern, mont da govez, bep ar mare, lavaret pedennou ganeoc'h?—Tud, ha n'ho deuz ket ar Religion ne c'heller ket kaout fizians enn-ho.

PENVED GOUR'HEMENN.

Diouall na lazi den ebet,
Nag a zezir, nag a effet.

HA lazet hoc'h euz unan bennag, pe c'hlazet pe zikouret, enn eunn doare bennag, hen ober ? — Evit lamma ann dishenor, hag aliet hoc'h euz pe zikouret unan bennag da ober goall vloavez ? — ha deziret hoc'h euz ho maro hoc'h-ui unan, pe varo ar re all ? — ha kassoun-hoc'h euz dalc'het ouz unan bennag ? —

Pegeit amzer ? — klasket en em venji, pe aliet re all, d'en em venji ? — klasket ober prosezou d'ar re all, dre jealousy, pa vouiac'h ervad n'edo ket ar guir ganeoc'h ? En em gannet ? great chagrin ?

Ha roet hoc'h euz, evit koll ann eneou, goall skuer, dre ho koaperez a enep ar Religion, a eneb ar garantez a dleit d'ho nessa, pe dre gomzou re laosk, re libr, pe dre ho puez direol ? Ar c'homsou vil a zo evel ar moged. Rei a reont da anaout d'ann oll e z'euz tan en ti. Tan al lubrisite a zo kalz goassoc'h eget ann tan goall. Rak eunn ti devet gant ann tan goall a c'hell beza savet enn he zav a nevez. Eur vech kollet ho prud vad ganeoc'h, da viken eo. Diouallit, pennou tiegez.

C'HUEC'HVED HA NAOVED GOUR'HEMENN.

Lubrik na vezi ket ivez,
Nag a gorf nag a volonteaz,
Na c'hoanta dre luxur pec'hi,
Nag e sonj vil n'en em blij.

HA c'hui hoc'h euz dalc'het, a volonteaz vad, enn ho speret, sonjou ha desi-

rou dishonest ? — Ha chomet hoc'h da zellet ouz tud, pe ouz traou all a eneb ar purete, hag ne c'hellac'h ket chom da zellet outho, heb peched ? — Ha lavaret hoc'h euz komzou goloet, re skanv, divodest ? — kanet soniou divalo, pe zilaouet anezho gant plijadur ? — ha n'oc'h ket eat a eneb ar vodesti, dre ho komzou, dre hoc'h aliou, dre ho kuiskamant, betek lakaat ann dud da gaozeal divar ho penn ? — ha n'hoc'h euz-hu ket great a drao louz ganeoc'h hoc'h unan, pe gant ar re all, tud dimezet marteze ? — Goulennit kuzul digant ho tad kovessour, ha sklerijenna a reio ac'hanoc'h.

SEIVED HA DEKVED GOURC'HEMENN.

Laerez na miret madou den,
Gant gouiziegez na rit biken.
Na zezir madou da hentez,
Evit ho c'haout dre falzentez.

Ha laeret hoc'h euz archant pe draout all ? — Ha gaou hoc'h euz great ouz ho nessa er c'houmerz, o rei muzul re vihan, o verza mac'hadourez fall evit hini mad, o verza loaned, a ioa ennho eur

si bennag, evit loaned direbech ? — ha c'hui, hoc'h euz prenet eunn dra kalz nebeutoc'h, ha guerzet kalz keroc'h eget na dalie, abalamour m'ho poa asfer ouz tud heb gouiziegez, tud dizesk, o profita, evel-ze, euz ho nebeut a anaoudegez euz ann traou ?

Ha c'hui, micherourien, hag implijet hoc'h euz mad amzer ho tervez, hervez ho kalloud, ho koustians ? — ha c'hui hoc'h euz miret eunn dra bennag euz ar pezh a ioa bet fiziet ennoc'h, evel mezer, lienn, neud, pe draou all ?

Ha profitet hoc'h euz, euz ho karg evit ober gaou, evel eur c'hulator e kenver minoret, evel eur mestr hag a lakaffe he vugale, he zervicherien da laerez ? — ha meulet hoc'h euz al laeron, o lavaret e zoant tud fin, ijinus, o hardissaat anezho enn ho fallagriez ? — ha roet hoc'h euz, enn ho ti, digemer da laeron, pe d'ar pezh ho doa laeret ? — sikouret anezho, enn eunn doare bennag ?

Ha nac'het hoc'h euz arc'hant, pe draou all, kemeret, e prest var digarez ma n'oa ket great paper, ha ne c'helljet ket ho

poursu dirag ar justis ? — ha c'hui hoc'h euz daleet da bea ho tie, pa 'z oa eaz deoc'h hen ober ? — ha manket hoc'h bet da renta, d'ho ferc'henn, ar pez ho poa kavet enn ennn ti, pe var ann hent, pa vouiac'h da biou oa ?

C'hui, bugale, gragez, pennou tiegez, n'hoc'h euz ket-tu great a c'haou ouz ho tud, ha kemeret arc'hant, dre guz, pe o verza traou heb rei da anaout da dud ann ti, pe pa 'z'eo bet rannet ann denvez hag ann traou all ?

Ha c'hui hoc'h euz great drouk d'ho nessa, enn he gorf, en eur voall gass anezhan ; enn ho loaned, en eur voall skei gantho ?

EIZVED GOURC'HEMENN.

A enep den falz testeni
Na gaou ebet na liviri.

Da z'hoc'h bet galvet dirag ar justis, ha diskleriet hoc'h euz ann traou, hervez ar virionez ?

Ha klasket hoc'h euz gounit ho testou dre arc'hant, pe dre brokessaou kaer, pe oc'h ober aoun dezho ?

Ha c'hui hoc'h euz great pe lakeat ober aktou pe verkou faos, billiji, pe guit-tansou faoz ?

Ha c'hui, hoc'h euz lavaret gevier da noazout ? — ha drouk-prezeget hoc'h euz d'euz ar re all, o tiskleria ho dizurziou d'ar re, ne anavezent ket anezho, pe o kounta, var lerc'h ar re all, heb gouzout petra ioa guir ? — bet plijadur, o silaou dispenn ho nessa ? — Lakeat trouz etre tud euz ar memez ti, amezeien, kerent, gant ho teod fall, oc'h inventi gevier ? — ha kavet hoc'h euz abeg enn dud all, abalamour d'ho dillad, d'ho c'homzou, d'ho doare ? — ha lennet hoc'h euz, heb rezoun, liziri ar re all, ha diskuliet ar pez a ioa merket varnezho ?

Hag insultet hoc'h euz ho nessa, enn eunn doare grevus ? o rebech dezhan he zefaotou, defaotou he dud ? o kounta dezhan langach a bep seurt ? N'euz ket a garantez virrion evit Doue, ma n'euz ket a garantez evit ann nessa !

III — GOUR'HEMENNOU ANN ILIZ.



KENTA HAG EIL GOUR'HEMENN.

Ar Goueliou berz a zantifi
Neuze pep labour a lezi.
Ha kleo ha benn da benn.
Sul ha gouel berz ann offerenn.

Ann dra-ma a zo bet ispliket deoc'h,
Aenn trede gour'hemenn a Zoue.

TREDE GOUR'HEMENN.

Eur veach ar bloaz da vihana,
E kovessai heb nac'h netra.

Ha manket hoc'h euz da vont da govez
da vihana, eur vec'h er bloaz? Kement-
se a zo pec'hed marvel, dreist oll, ma ho
poa pec'hejou grevus, var ho koustians?
— O veza chomet heb kovez da Bask? ha
krede hoc'h euz e c'hellac'h gortoz ar
bloaz varlerc'h? Seul vui e taleit da
govez, seul vrasoc'h a-ze eo ho pec'hed!
— ha great hoc'h euz, bep bloaz, eur
govession vad da Bask? rak ne c'heller
ket miret, pe heulia lezenn ann Iliz, dre
eur govession fall, pe eur sakrilach; hag
evit ar gommunion, ar memes tra.

PEVARE GOUR'HEMENN.

Ha da Grouer a resevi,
Da Bask devota ma c'helli.

Ha manket hoc'h bet da ober ho Pask?
— ha c'hui a zo eat avechou da gom-
munia evit plijout d'ann dud, evit beza
istimet? — goude beza kommunit, ha
c'hui a zo eat buhan euz an Iliz, heb
beza chomet eur pennad amzer dra dru-
garekaat Doue? — Pa n'hoc'h euz ket bet
ho Pask, ha deuet hoc'h goudeze da
gommunia, enn amzer merket deoc'h? —
Ann obligasion da gommunia a bad a
doug ar bloas. — Ha great hoc'h euz ho
kommunion, epad ann amzer Fask, enn
hoc'h Iliz parrez, pe chomet hoc'h bet
heb goulenn kounje digant ann Aotrou
Persoun d'hen ober, enn eur barrez all?

Ha lezirek hoc'h bet da zeski, pe da la-
kaat deski ho pugale, evit ober ho Fask,
d'ann oad merket? — Ha p'en d'euz ren-
ket ho Pastor refuz ho pugel, abalamour
ma'zoa re yaouak, pe re zizesk, ha
n'hoc'h euz-hu ket krosmolet, pe zalc'het
zoken kassouni outhan, pell amzer?

PEMPVED GOURC'HEMENN.

Iun a ri ann daouze deiziu,
Ar c'horais hag ar vijilou.

HA iunet hoc'h euz, enn amzer pe ann
deiziu merket gant ann Iliz, pa n'oa
netra o viret ouzoc'h ? ha pa ho poa ann
oad da iun.

C'HUEC'HVED GOURC'HEMENN.

Kig, nemet da zeiz Nedelek,
Guener ha sadorn ne zebr ket.

HA debred hoc'h euz kig d'ann deiziu
difennet ? — Mistri ha mestrezet, ha
roet hoc'h euz kig da zibri d'ho pugale,
d'ho servicherien, en eur zigarezi e vez
drebet kig el leac'h all ? — pe en eur la-
varet, n'eo ket goassoc'h debri kig, enn
dervezion-ze, eget er re all ?

Ha great hoc'h euz ann aluzenn gour-
c'hemennet, evit ar c'horais, e plas ar
vijil ? Enn hon amzer, ann Iliz e deuz
soupleat, evit he bugale, lezenn ar c'ho-
rais ; mes c'hoant e deuz, ha goulenn a
ra, e raffent eunn aluzen, e plas ar vijil
lammet divarnho.

IV. VAR AR PEC'HEJOU KAPITAL

1^o OURGOULL.

HA c'hui hoc'h euz kemeret fougant
ho speret, ho madou, ho tillad, ho
nerz, ho pugale zoken, e doare ma n'ho
peffe ket resevet ann traou-ze digant
Doue ? — ha disprijet hoc'h euz ann dud
paour, ann dud koz, ann dud infirm, ar
re a zo izeloc'h eget-hoc'h ? — ha deziret
hoc'h euz kals beza meulet, hag estimet ?
— ha c'hui n'hoc'h eus-hu ket great a
zispignou, enn tu all d'ho kalloud, dre
fougerez.

2^o AVARISDED.

HA karet hoc'h euz re ho madou ? lakeat
hoc'h oll fizians ennho, heb soursial
euz ho silvidigez, nag euz ho teverion a
gristen ? — ha c'hui hoc'h euz deziret, bet
mall bras da zestum arc'hant, n'euz forz
penaoz, en eur labourat da zul ha da
c'houel, en eur refuz ann traou a zo red
da dud ho ti, an aluzenn d'ar beorien,
hoc'h aluzenn evit ann oberou mad, en
eur lavaret gevier, ha toui zoken e faoz
evit guerza keroc'h etc... ?

3° AL LUXUR.

EN eur isplika ar c'huec'hved hag ann
naoved gourc'hemenn a Zoue, on euz
lavaret ar pec'hejou a reer var al luzur.

4° ANN AVI.

HA c'hui a zo bet trist, o velet eur vad
bennag oc'h erruout gant ho nessa?
pe santet eur joa vraz, enn ho kaloun, o
velet eunn drouk bennag oc'h erruout
ganthan, pe o klevet diskrial anezhan? —
Evit koll ann estim en doa ho nessa dirag
ann dud, ha lavaret hoc'h euz gevier, pe
ziskleriet ho zefaotou kuzet? — pe zoken,
dre avi, great droug ha gaou d'ho nessa,
enn he vadou, distanket ar parkeier, ha
bet kaoz d'al loened da vont da vressa,
pe da zibri ann traou, a ioa enno? — ha
paet hoc'h euz ann domach, great egiz-ze?

5° AR GOURMANDIS.

HA c'hui a zo bet mezo? « Mallos, eme
har Speret Santel, d'ar re a zo krenv
da eva. » — Enn ho mesventi, ha c'hui
hoc'h euz lavaret blasfemou, komzou
louz, klasket affer, great trouz, skoet,

roet goall skuer? Koupabl hoc'h euz ann
oll bec'hejou-ze, petra bennag n'hoc'h euz
sonj ebet, goudc-ze, euz ar pezh hoc'h euz
great, nag euz ar pezh hoc'h euz lavaret.

Hostizien, ha c'hui hoc'h euz, gant
anaoudegez, roet pe lakeat rei efach da
dud mezo dija, pe roet d'ann dud da eva
beteg ho mesvi? — Ped guech, ha da bed
hoc'h euz rentet ar servich fallakr-ze? —
Ha c'hui, paotret yaouank, merc'hed
yaouank, ha n'hoc'h euz ket a leac'h da
rebech d'eoc'h hoc'h unan da veza bet o
kafea assemblez, enn hostaliriou? — Ha
drebet hoc'h euz re, betek noazout d'ho
iech'hed, d'ho nerz? — Bet re figus var ho
poued? — Drebet dre laer, etre ho pre-
jou? great lipouzeréz?

6° AR VUANEGEZ PE AR GOLER.

HAG eat hoc'h bet kement e koler, ma
ne vouiac'h mui na petra reac'h na
petra a lavarac'h? neuze ar goler a
c'hell beza eur pec'hed marvel. — Enn
ho koler, ha lavaret hoc'h euz pec'hejou,
mallosiou, injuriou d'ho nessa, deziret
drouk dezhan? — Klasket en em venji?
— Skoet marteze?

Ha roet hoc'h euz goall skuer d'ho pugale, pe d'ar re all, dre ho koler hag ho komzou dirollet? — ha penn-abeg hoc'h bet d'ar re all da gounnari, abalamour d'ho kassouni ha d'ho penn-fall?

7^o AN DIEGI.

HA diegi hoc'h euz bet o sevel euz ho kuele? — Chomet ennhan, re zivezat?

Ha laeret hoc'h euz ann amzer, o chom da ehana, da gonta marvailloù pe draou difennet, pe chomet da c'hoari el leac'h labourat? — ha boaz hoc'h bet da goll evel-se, ann amzer? — ha c'hui hoc'h euz, dre ziegi, manket d'ho pedennou, d'ann offerenn, da vont da govez, pe zoken da ober ho Pask? — En eur bedi er gear, pe enn Ilis, ha klasket hoc'h euz re hoc'h eaz, oc'h en em lakaat enn eunn doare divall? — ha kustum oc'h da veza re zivezat enn offisou, ha kement-se dre leziregez?

Gragez, ha derc'hel a rit urz vad, enn ho ti? — ha n'eo ket ho leziregez a zo kaoz ma vez, ennhan, kement a loustoni? — Lezet hoc'h euz traou enn ho ti, boued dillad da vont da goll, dre faot ho c'hem-

penn, ha soursial anezho? — dre ho leziregez, ha n'hoc'h ket kaoz d'ho tud d'en em glemm, gant rason, ouz ho boued? — d'ho pugale, da veza o tougenn dillad freuzet, pa c'hellac'h eaz miret euz kement-ze?

N'euz fors piou e veac'h, dalc'hit bepred sonj mad : ann deveriou great mad, al labour great hervez Doue a zo eur zourzen a joa, a eurusted, hag a silvidigez evit ann oll.



V. VAR DEVERIOU HO STAD.



E pep stad, e bep renk, er bed-ma, e zeuz deveriou, hag a rankomp da ober dindan boan a bec'hed. Pep hini a dle anaout ann deveriou euz he stad evit gallout, eaz ha sur, heulia anezho. Kaout a reer anezho, merket sklear e gourc'hemennou Doue, e re ann Iliz, hag er pe-c'hejou kapital.

TREDE LODENN

AR GONTRISION

I. — PARDOUN EBET HEB KONTRISION

GOUDE beza evesseat piz euz ar gous-
tians, e renker kovez, gant lealded,
ann oll bec'hejou, da vihana, ann oll be-
c'hejou marvêl, ha diskleria peb guech
hag ar pez a jench doare d'ar pec'hed.
Euon dra vad eo zoken lavaret ar pez a
ra d'ar pec'hed beza grevusoc'h.

Mes, kement-se n'eo ket avoualc'h, evit
b za pardounet gant ann Aotrou Douc.
Red eo oc'hpenn-ze, ha dreist oll, kaout
kontrision. « Ar c'heuz, eme ar Sened a
Drant, eo ar c'henta tra, a dle beza e
kalouñ ar pec'her, evit kaou ar pardoun
euz he bec'hejou. *Contritio quæ primum
locum, inter dictos pœnitentis actus, habet.* »
Ann diou lodenn all euz a Zakramant ar
Binijen, ar Govession hag ar Zatis-
faksion a deu da eil. N'int ket red mad
atao, evel ar Gontrision. Rak, pardounet

e c'heller beza avechou, heb beza bet o kovez, hag heb beza paet ar boan, dleet d'ar pec'hed. Evel-se, eur c'hlenved a laka ac'hanomp dilavar, enn eunn taol kount, heb galloud kovez egiz ebet, p'e, mar kirit, koueza a reomp raktal goall glanv, dare da vervel, ha n'euz beleg ebet da govez ac'hanomp, en despet d'ar c'hoant braz on euz. Ann Aotrou Doue, a dra zur, ne refuzo ket deomp ar pardoun, gant ma vezo hor c'haloun, rannet gant ar c'hlac'har da viza hen offanset. — Er memes tra ; pardounet e c'heller beza ivez heb ar Zatisfaksion, evel ma z'eo : pa varvez dioc'h-tu goude beza resevet ann absolvenn, heb beza gellet rapari ann offans great da Zoue, hag ar gaout great ouz ann nessa. Mes biken avad, ar pec'her ne c'hell beza pardounet he bec'hejou dezhan gant ann Aotrou Doue, ma n'en deuz ket eur guir contrision. Kaer en devezo kovez he bec'hejou, ma n'en deuz ket eur c'heuz guirrion dezho, n'en deuz pardoun ebet da c'hedal. Ober a c'hell ar binijennou ar re rusta, iun divar bara ha dour, rei he holl danvez enn aluzenn, he

bec'hejou a jomo heb beza pardounet, keit ha ma n'en devezo ket a c'hlac'har dezho. Setu ar pezh a lavar deomp ar roue David, er Psalm gaer, ar *miserere mei, Deus* ; « ma c'houlennfac'h diganen, o va Doue, eme ar roue prophet, va oll madcu evit kaout diganeoc'h ar pardoun euz va fec'hed, me ho roffe deoc'h, a greiz va c'haloun. Mes, n'eo ket euz ann traou-ze e rit stad. Ar pezh a blij deoc'h eo eur galoun rannet gant ar c'hlac'har. Ne jomoc'h morse, o va Doue, heb kaout truez euz eur galoun glac'haret hag humiliet. *Cor contritum et humiliatum, Deus, non despicies.* » Ar roue David en deuz bet eur c'heuz guirrion d'he bec'hed, ha, dre gement-ze, eo bet pardounet dezhan. Nan, eur vech c'hoas, n'euz ket a bardoun da c'hortoz digant Doue, ma n'on euz ket a contrision. N'eo ket muioc'h enn amzer vremen eget guechall goz. « A viskoas, eme ar Sened a Drant, ar contrision a zo bet eunn dra red, evit kaout ar pardoun euz hor pec'hejou. *Fuit autem quovis tempore, ad impetrandam veniam peccatorum, hic contritionis matus necessarius.* »

Goulskoude, nag a hini, daoust ma z'eo red mad ar gontrision evit beza pardounet gant ann Aotrou Doue, pa z'eont da govez, ne zonzont nemet enn ho c'hovession, heb sonjal, koulz lavaret, er gontrision. Marteze zoken, e reomp, siousas ! eveltho. Evessaomp eta, ha dalc'homp sonj mad : heb ar gontrision, n'euz pardoun ebet.

II. — PETRA EO AR GONTRISION ?

« **A**R Gontrision, eme ar c'hatekiz, da heul ar Sened a Drant, a zo eur c'hlaç'har er galoun, hag eur gassouni ouz ar pec'hejou on euz great, gant eur guir volonteze da viret ouz ar pec'hed, enn amzer da zont. *Contritio animi dolor ac detestatio est de peccato commissio, cum proposito non peccandi de cætero.* » Sonjomp ervad e pep hini euz ar c'homzeu-ze.

Da genta, ar gontrision a zo eur c'hlaç'har. — Eur guir gontrision a laka ann Aotrou Doue da gemer truez ouzomp. Rag, ar gontrision a gass da netra ar pez a ra d'ar pec'hed marvel beza e kaloun ar pec'her. Evel terri, bruzuna a ra ar

galoun-ze, deuet da galedi, gant ann drouk, hag abalamour buez ar c'hraññ ne ma mui ennhi. Ann douar, pa n'euz ket a zour ganthan, a zo douar maro ha seac'h. Pouloudenna a ra. Ar ger kontrision (*contritus*) a verk al labour-ze, terri, hag ar c'hlaç'har eo a ra anezhan, setu aman penaoz.

Ar blijadur eo ar penn kenta euz ar pec'hed marvel. Abars dizenti oc'h ann Aotrou Doue, ar pec'her, touell etgant ar goall ioulou ha gant ann drouk-speret, a gav mad ar pezo a eneb d'al lezenn gristen. Eno e kav he blijadur. Ma kass da benn ar sonj pe ar c'hoant, a blij kement dezhan, e ra eur pec'hed marvel ; hag e c'heller lavaret e teu da galedi ouz ann Aotrou Doue. A dra zur, kaled eo eur mab, e kenver he dad, pa lavar dezhan : nan, ne zentinn ket. Dre ar pec'hed marvel e troomp kein da Zoue, hag e lakomp disparti etre hon ene hag hen. Kollet neuze, gant ann ene, ar c'hraññ, he vir vuez. Saour ann env a zo eat kuit, gant ar c'hraññ. Evel dizec'hed, maro eo ann ene paour. *Separatio a Deo mors*

animæ. Ne jom mui ennhan, tamm guir karantez evit Doue ! Ha petra eo ar penn kaoz eur ar goall heur-ze, nemet ar blijadur direiz ha milliget, a douellas ar pec'her ? keit ha ma chomo er stad reuzeudik-ze, n'euz pardoun ebet da c'hortos. Ann Aotrou Doue n'en deuz nemet kaz hag euz outhan. Red eo eta d'ar pec'her, evit distrei ervad ouz Doue, ha kaout ar pardoun euz he pec'hed diganthan, chench santimant, agrènn. Ar pezh ne c'hell da ober, nemet gant sikour ar c'hrass. Touellet eo bet gant ar pec'hed. Ann touellerez a lam, digant ann den, ar sklerijenn. Evel dallet eo, gant ar pezh a douell anezhan. Grass ann Aotrou Doue a deu da skleraat he zaoulagad. Ober a ra evel ann eol, pa e ma hema o para. Rei a ra sklerijenn ha tomder ; ha gant sklerijenn ar c'hrass, deuet ouz ann Env, ha gant ann domder euz garantez Doue, ar pec'her a anavez he fazi hag ar gaou, a rea outhan ar pec'hed marvel. Brassoc'h droug ebet ne c'hell en em gaout ganthan, her gouzout a ra breman. Dre-ze, ar blijadur direiz a

douelle anezhan a ziagent, a deu da veza evithan eunn displijadur ar vrassa. Glac'haret meurbet eo he galoun, da veza offanset eunn Doue infinimant mad, hag infinimant d'in da veza karet. Guelet a ra sklear, pegen ingrat eo bet, enn he genver ; ha pegen diskiant eo bet, o tenna varnezhban drouklans eunn tad ker madelezuz. Kaz en deuz outhan he unan, pa vel eo en em lakeat, dre ar pec'hed marvel, e riskl da veza barnet, evit ann oll amzer, d'ar skrijussa poan, a ouffe ann den da c'houzanv, da dan ann Ifern. Ouspenn ar c'hlac'har, eur gassouni vraz ouz ar pec'hejou, en deuz great, a deu enn he galoun. Ne gar ket mui ar mallosiou, ar c'homzou dishonest. Hano ebet dirazhan euz ar goall gompagnunezou, euz ann hostaliriou, euz al lec'hou fall, en deuz guechall darempredet. Chenchet eo, evel eunn all enn he blas. Hiviziken, e lakai he boan da drec'hi he dechou fall, ha d'en em ziuall dioc'h kement tra, a zoug d'ar pec'hed. Eur guir volontez, ha n'eo ket eunn hanter volontez, eur volontez laosk, mes, eur volontez start ha kaled en deuz

d'en em viret diouz ar peched, enn amzer da zout. Setu petra eo ar gontrision.

Ar gontrision a renk beza er galoun, ha n'eo ket var beg ann teod. — Ma ne rit ket a binijen, eme hor Zalver enn Aviel, oll en em golloc'h. Hogen, heb ar gontrision er galoun, n'euz ket a vir binijenn. Ann drouk, penn kaoz euz ar pec'hejou great, a zo er galoun. Hor Zalver Jesus-Krist hel lavar deomp : « euz ar galoun, emezhan, e teu ar sonjesonou fall, ar muntrou, ann avoultriaj, ar viltansou, al laeronsiou, ar falz leou-touet, ar blasfemou ; hag ann traou-ma eo, a sklabez ene ann den. *Hæc sunt, quæ inquinant hominem.* » Guir eo. Rak, petra eo ar pec'hed ? Ar pec'hed, eme Sant Augustin, a zo eur zonzj pe eur gomz, pe eunn dra, great eneb lezenn ann Aotrou Doue. Mes, ar sonj-ze, ar gomz-ze, ann ober-ze great pe lavaret eneb lezenn ann Aotrou Doue, a ioa da genta, assentet gant ar galoun. Plijout a rea dezhi. Al laeronsi a blij d'al laer, araog hen ober. Assantet en deuz dezhi, enn he galoun : ha, pa deu da heur ober he daol, al laeronsi a ra n'eo, nemet

evel pa lavarfenn, eul louzaouenn fall, divouanet var he grisiou. Ne veler ket, gant ann daoulagad, griziou al louzaouenn. Kuzet int eun douar. Ar griziou-ze a zo, goulzkoude, penn kaoz maza var louzeier fall er parkeier. Epad ma chomo ar griziou enn douar, al louzeier ne ehanint ket, ha ne zaleint ket d'en em ziskuez Abalamour da-ze, pa vezer o c'houennat, n'eo ket avoualc'h trouc'ha al louzeier var gorre ann douar ; red eo, evit ober labour-vad, ho dizc'hrisienna. — Kovez, heb kaout kontrision d'ar pec'hejou er galoun, a zo, koulz lavaret, trouc'ha, var gorre ann douar, korz al louzeier. Ar griziou a jom, hag a zivouan adarre, heb dale. Ken louz ar park eget ma 'zoa a ziagent. N'euz chenchamant ebet. Ar Gontrision, evit laza griziouar pec'hejou, a renk beza er galoun, pe egiz all n'eo ket guirion ; hag hor pec'hejou n'int ket pardounet deomp. Ann Aotrou Doue a vel ervad ar peza zo e kaloun ann den. Anaout a ra ar zonzjezonou ar muia kuzet, ha p'eo guir, n'euz great, nemet ann n'euz da c'houennat, heb laza griziou ar

pec'hed, ne ro ket ar pardoun. Ar pec'her n'eo ket distroet ounthan, e guirionez. Rag, ann Aotrou Doue a c'houlenn, heb damanti, e tistroffe ounthan ouz he oll galoun. *Convertimini ad me in toto corde vestro.*

N'eo ket avoualc'h eta, pa 'zeomp da govez, diskleria piz ann oll pec'hejou, on euz sonj anezho, kaout aoun zoken n'e ankounac'hfemp unan bennag ; red eo lavared, e poent hag e mare, ann Akt a Gontrision, a greiz hor galoun, gant eur c'heuz beo ha gant eur gassouni guirriou ouz ar pec'hejou, on euz great. Ni a fell deomp, hiviziken, trei kein d'ar pec'hed, kousto pe gousto. Hor c'homzou ne dleont ket bet beza komzou goullo ha balbouzet ; mes, komzou kalounek, ha lavaret gant santimanchou a binijenn hag ar vir c'hlac'har.

III. — GLAC'HAR AR GONTRISION ?

PA 'z eo guir ar Gontrision a zo eur c'hlac'har er galoun, guelomp breman peseurt glac'har eo hounnez ? Rak, glac'har ha glac'har a zo. Glac'haret omp

avechou, ha glac'haret braz zoken, abalamour da eur c'holl c'hoarvezet ganeomp, abalamour da eur gaou great ouzompenn hor madou, enn hor brud vad, pe gant ann nessa, pe gant ar pec'hejou, on euz great, gant ar vuez fall on euz renet. Bea-c'hia a reont ar boaniou-ze kement hor c'haloun, ma skuillomp daelou puill ha c'huero meurbed. Goulskoude, n'eo ket hounnez ar c'hlac'har, mad da laza grisiou ar pec'hed e kaloun ar pec'her, ha da gaout, digant ann Aotrou Doue, ar pardoun euz hor bec'hejou. Nan ar c'hlac'har, mad da gaout ar pardoun euz hor pec'hejou, ar guir gontrision, enn eur ger, a dle beza, eme ar c'hatekiz, souverén, universel, ha dreist naturel.

1^o Ar gontrision a dle, da genta, beza souverén. Eur c'hlac'har eo. Mes, eur c'hlac'har dreist pep glac'har all, a c'hlasse rei beac'h d'ann den paour, var ann douar-ma. Kement-ze a zo eunn dra eaz da gomprenn. Daoust ha ne d'eo ket ar pec'hed marvel ar brassa droug a ra ann den, hag a ouffe erruout ganthan ? Piou on euz-ni offanset dre ar pec'hed

marvel, ma n'eo ket ann Aotrou Doue, he-unan? Dizenti ouz Doue enn eunn dra c'hrevus, gant eur vouiziegezh hag eur volontez barfet, a zo ober fae euz he lezenn, euz he volontez santel, disprijout he c'hourdrouzou. Egiz pa lavarfemp da Zoue eo : « pe c'hui a vezo kountant, pe c'hui ne vezoc'h ket, ne rann forz ! va fenn fall a rinn ; va slijadur a gemerinn ; ne zentinnu ket ouzoc'h. *Non serviam.* » Pebez dismegañs ! pebez offans great da biou ? d'ann Aotrou Doue, hor C'hrouer, hor Zalver, hag a vezo, eunn deiz da zont, hor Barner ! ober kement all da Vestr ann Env hag ann Douar ! A dra zur, ar c'hlaç'har, goest da rapari eunn henvelep offans, a die beza dreist peb glac'har all.

Oc'hpenn-se, peseurt koll, peseurt drouk, peseurt poan a c'hellfe beza lakeat e skoas gant ar c'holl, gant ann drouk, gant ar gaou a ra ouzomp eur pec'hed marvel hebken. Ganthan, e kollomp hon ene ; p'eo guir, ma teuffe ar maro deomp, er stad reuzeudik-se, hon ene a iasse da leski da dan ann Ifern da viken. Ar goassa tra eo, a dra zur, a ouffe erruout

ganeomp ! Koll hon ene eo koll peb tra. N'eo ket diez goudi ze anaout, eo ar Gontrision eur c'hlaç'har, dreist peb glac'har all pe zouveren. Ar c'holl ar brassa, ar baourentez, ann dishenor, ar maro zoken n'int ket da veza lakeat e kemm gant eunn henvelep goall-heur ! Kentoc'h e karfemp eta gouzanv n'euz forz peseurt poan, eget offansi Doue marvelamant.

Mad eo deomp gouzout : ar c'hlaç'har-ze, petra bennag ma 'z eo eur c'hlaç'har dreist peb glac'har all, a c'hell beza e guirionez enn hor c'haloun, hep ma teuffe d'en 'em ziskuez, a zianveza, dre hon daelou, dre hirvoudou, pe a hent-all. Rak, n'eo ket eur C'HEUZ A ZANTIMANT eo, evel ar c'heuz on euz d'hon tud, pa gollomp anezho ; mes, ar gontrision a zo kentoc'h eur c'hlaç'har, eur C'HEUZ A VOLONTEZ.

N'eo ket red ken nebeut, ha n'eo ket mad zoken, sonjal er pezh a raseomp, ma ve roet deomp da joas etre gouzanv ar maro, pe oker ar pec'hed-ma pe ar pec'hed-zhont. Ann Aotrou Doue a c'houleun diganeomp kassaat ar pec'hed dreist

pep tra, er mare m'en em gavomp enn-hann ; egiz pa lavaromp ann Akt a Gontrision. Ma remkfemp, divezatoc'h, lakaat hor buez var var kentoc'h eget hen of-fansi, ann Aotrou Doue a reio deomp ar grassou, m'hon euz ezomm anccho. A-voualc'h eo eta kaout eur Gontrision souverenn, e mare hag e poent.

Ar Gontrision souverenn-ze a c'hell dont deomp, abalamour da veur a ræzoun, parfetoc'h ann eil eget ebenn, Ma n'ema ar c'hlaç'har dreist peb glaç'har, enn hor c'haloun, ha ma ne gasaomp ar pec'hed marvel, nemet abalamour ma ra deomp koll ar Barados a meritout ann Ifern, neuze eo disterroc'h ar ræzoun, p'eo guir, e sonjomp muioc'h en ho interest hon unan, eget enn offans great da Zoue. Dre-ze n'on euz nemet eur Gontrision imparfait. Var hent ar pardoun emamp, evit guir ; mes, n'on euz ket anezhan c'hoas. Red eo reseo ann absolvenn, evit he gaout.

Mar on euz ar Gontrision-se, abalamour ar pec'hed a offans eunn Doue, ha n'euz fin ebet d'he vadelez ; neuze, on euz

eur gontrision barfet. Karet a reomp Doue, dreist peb tra hag abalamour dezhan he unan. Eur garantez barfet on euz evithan ; hag ar garantez barfet-ze, evel ann tan, a zev ar pec'hed, beteg he gass da netra. Gantbi, ar pec'her a resev ar pardoun euz he bec'hejou, araog ann absolvenn. Mes, atao en deuz, gant ar garantez barfet-se, bolontez da govez : p'eo guir, Doue a c'houlenn, digant ar bec'herien, ma kovessaint d'ar beleg, da vihana, ann holl bec'hejou marvel, a c'helfent beza great.

2^o Oc'h penn-ze, ar guir gontrision a dle beza universel, en em astenn var ann oli bec'hejou marvel assemblez, heb ma chom-fe nikun, ha ne ve ket a geuz dezhan. N'euz menek aman nemet euz ar pec'hejou marvel Rag, eur pec'hed marvel, ha ne vet ket a geuz dezhan, a laka ac'hanomp da goll grass Doue. Hogen, unan a zaou, pe vignoun pe enebour ? n'euz ket da varc'hata ! Ann Aotrou Doue ne bardouuo biken d'ann nep, a gar c'hoas eunn dra bennag, hag a zo kas-seat ganthan he-unan dreist pep tra.

3^oEunn henvelep gontrisiomp, nec'hel-
lomp ket he c'haout di eizomp hon unan ;
digant Doue e tle dont deomp. Ar gon-
trision a zo, evel ar Feiz eunn done-
zoun. Abalamour da-ze ar gontrision
a dle beza dreist naturel, da lavaret
eo, dreist hon galloud hon unan. Ann
den a c'hell, dre he volonteze vad, koll
buez he ene, koll grass ann Aotrou
Doue, en eur ober ar pec'hed marvel :
mes, kaout ar c'hrass-ze, a nevez, a
zo cunn dra dreist he c'halloud. Doue,
ha Doue hebken a c'hell he rei deomp.
Kaout eur zonz vad, talvoudeg evit
hor silvidigez, a zeblant deomp eunn
dra zister, koulz lavaret eunn dra a
netra ; ha goulskoude, eme ann Abostol
sant Paol, ne c'hellomp kaout ar sonj
vad-ze, nemet digant Doue on deffe a-
nezhi. « *Non quod sufficientes simus co-
gitare aliquid a nobis, quasi ex nobis ;
sed sufficientia nostra ex Deo est.* » Den,
eme c'hoas sant Paol ; ne c'hell lavaret
ann hano Santel a Jesus, enn eunn doare
talvoudek, nemet gant sikour ar Spered
Santel. « *Nemo potest dicere, Dominus Jesus,*

nisi iu Spiritu Sancto. » « Mallos, eme er
Sened a Drant, d'ann nep a lavaro, e
c'hell ann den kaout keuz avoualc'h d'he
bec'hejou, hep sikour Doue evit beza
pardounet. *Si quis dixerit, sine praeveniente
Spiritus Sancti inspiratione atque ejus adju-
torio, hominem poenitere posse, sicut oportet,
ut ei justificationis gratia conferatur, ana-
thema sit.* » Goulennomp eta, abars mont
da govez, ar Gontrision digant ann Ao-
trou Doue, dre eur bedenn kalounek.
Hor Zalver a raio, neuze, var hon ene, eur
zell trugarezuz, hag ar zell trugarezus-ze
a zigorro daoulagad hor spered, dallet
gant ar pec'hed, hag a dorro kaleder hor
c'haloun, evel ma en em gavas guechall
gant san Perr. Ann abostol reuzeudik-
ma en doa nac'het he Vestr, a benn teir
guech ; hen, hag a garie, goulskoude,
Jesus gant eur'garantez ken nerzus, ker
birvidik ! Prest oa, eunn nebeudik araok,
eme ann Aviel, da rei he vuez evinthan !
Mes, siouas ! ar goall skuier, ann aoun, na
ve great goap anezhan gant ar zoudarde ;
ha gant servicherien ar beleg braz, a ioa
assamblez gant Perr er porz, a daolas ann

denvalijenn enn he spered, hag ar brassa simpladurez enn he galoun. Dallet oa, koulz lavaret. Rak, goassoc'h goas e toue, e zrouk komze. Poanius oa e glevet. Hor Zalver a reas eur zell var he abostol digaloun ; ha setu raktal, Perr, sklerijennet he speret, fraillet he galoun gant ar c'heuz, gant ar c'hlae'har ; p'eo guir, eme ann Aviel, ez eaz, kerkent, er meaz euz ar porz, hag e tirollas da vouela dourek d'he bec'hed. *Et egressus foras, flevit amare.* — Lavaromp eta da Zoue, a greiz kaloun, evit kaout grass ar Gontrision diganthan : va Doue, o pezet truez ouzinn ; rak, ne d'ounn nemet eur pec'her paour. *Propitius esto mihi, peccatori.*

Eur vech sikouret gant sklerijenn ha gant nerz ar c'hrass, e tleomp sonjal, a zevri, er guirionezou, a zesk deomp ar feiz. Var ar virionezou-ze a dle divoan, enn hor c'haloun, santimanchou eur guir Gontrision. Ar boan, ar c'hleved, ann dishonor, eur c'holl bennag a laka ac'hannomp, buhau avoualc'h, da veza glae'haret bras. Eur mezhier a c'hell kaout keuz d'he bec'hed abalamour m'eo bet

klaev ; eul laer, abalamour m'eo bet paket ha kasset d'ar prizoun ; eunn den lubrik, abalamour m'en deuz great gaou ouz he iec'hed, ouz he vrud vad. Kementse oll a zo ræzouniou naturel. Er c'hlae'har-ze n'euz hano ebet euz a Zoue ; hag abalamour da-ze, n'eo ket mad da gaout ar pardoun. Red eo kaout keuz d'ar pec'hed evit ræzouniou dreist naturel, da lavaret eo, guirionezou desket deomp gant ar feiz, evel ma z'eo : ann droug, ar gaou a ra ouzomp ar pec'hed marvel, penn kaos da varo ar c'horf a da varo ann ene ; ar Baradoz kollet, hag ann Ifern meritet da viken. Pebez follentez ! hag ivez pebez ingrateri ! mont a eneb ha disprijout madelez Doue, ha karantez heb muzul hor Zalver benniget, maro var ar groaz evit hor zavetei.

IV.—AKT A GONTRISION.

va Doue, pec'hed em euz, ha kalz pec'het, o pet truez ouzinn hervez ho brassa madelez. Ia, pegen didalvez ounn bet eta evit ar peza zell ouz va zilvidigez ! Setu echuet ganen examina va c'hous-

tians. Hen anzañ a renkann breman : ne daolann ket evez avoualc'h, hag ounn digaloun da bedi, me goulskoude, ker sempl, ker bresk ! Kaz e m'euz ouzinn va unan. Nag a bed pec'hed em bije great nebeutoc'h, ma karjen beza evesseat goelloc'h, ha beza pedet aliessoc'h ann Aotrou Doue, ha dreist oll ar Verc'hez Glorius Vari, hor Mamm benniget, ha va Eal mad. Sklerijenn ha nerz a vije deuet dinn, ha ne vijenn ket bet touellet, ker buhan. Ekreiz ann deiz, ez ounn bet dall, dallet gant ann ourgouil, ann interest, ann avi, ar gourmandis, al lubrisite, ar vuanegz. Ar goall ioulou-ze a zav trum-moc'h, em c'haloun, eget al louzeier fall er parkeir ; ha ma ne zivouallann ket, ma ne bedann ket raktal pa zavont, ounn trec'het, heb dale, gant ann drouk. Eunn eulvenn tan pa n'eo ket mouget, a ra, e berr amzer, eunn tan goall, dreist oll ma kouez var draou seac'h kraz, ha buhan da zevi. Buhan ounn da zevi, evit doare. Rag ounn eulvenn tan a zo travoualc'h evit c'houeza ann tan goall em c'haloun. O peger guir komzou ann

abostol Sant Paol, pa lavar : « techet ounn da blijadurezion ar c'horf, hag ann tech-ze d'ann droug a zalc'h ac'hanon dindan he c'halloud. *Ego autem carnalis sum venumdatus sub peccato.* » C'hoant e m'euz da ober ar mad, ha padal, ann nerz a vank din evit hen ober ! Douget ounn bepred da heulia va zantimant, va flijadur, egiz pa venn mestr, ha pa n'em be mestr all ebet. Ia ; koulz lavaret, ar pezh a blij dinn a ra reolenn va buez, ann darn vrasa euz ann amzer ! ha siouas ! va zantimant, hag ar pezh a ra kement a blijadur dinn, n'int ket atao hervez lezenn ha bolontez va Mestr, va Zalver ha va Doue. Pell ac'hano ! Abalamour da-ze, ounn bet faziet ken aliez a vech, den reuzeudik ma'z ounn ! Piou va dispartio eta diouz ar c'horf-ma, a zoug ac'hanon kement da gouza er pec'hed ? Evel skuiz ounn ganthan, evit guir, pa velann ar gaou a ra ouzinn ar pec'hed marvel.

O pec'hed miliget ! ne m'euz nemet sonjal, a zevri, eunn nebeudik amzer, va skiant a ro dinn da anaout sklear ar pezh

a lavare guehall ar prophet : « *Quam malum et amarum est te direliquisse Dominum Deum tuum.* » Peger braz droug, ha peger c'huerdo eo beza dilezet ann Aotrou, ho Toue » Goulskoude, klevet a rann, avechou, tud diskiant avoualc'h, ha ne reont van ebet evit terri gourc'hemennou Doue ha re ann Iliz ; ken dallet int gant ho iouliou fall, klevet a rann anezho o lavaret, tud sot ma' z int : « Pec'het em euz ; hag evelato, me a garfe gouzout peseurt droug a zo c'hoarvezet gannen ? *Peccavi, quid mihi accidit?* » Evidon-me, kaer em euz sellet ha sonjal, ne gavann, a bep tu, var roudou ar pec'hed marvel, nemet ankeniou, tristidigez, dizurz, ann darvoudou ar re voassa. Er bed-ma, int stank ha c'huerdo, a dra zur, ann daelou, a zo skuillet abalamour dezhan. « Ann drubuill hag ann ankenn a voask nep piou bennag a ra ann drouk, n'euz forz piou e vesse, eme Sant Paol. *Tribulatio et angustia in omnem animam hominis operantis malum.* »

Ar sklerijenn, a laka va skiant da bara dirak va daoulagad, a zo dister e

skoas ar sklerijenn a ro dinn ar feiz, pa deu hou-ma da bara var ann droug ha var ar gaou, en deuz great. a viskoaz, ouz ann den paour, ar pec'hed marvel beteg enn, hag a reio c'hoas, o rumm da rumm, keit ha ma chomo ar bed-ma enn he zav.

Petra zo kaos, ma renkomp oll mervel ! ar pec'hed marvel, hag ar pec'hed marvel hebken ! « Ann Aotrou Doue n'en deuz ket great ar maro, eme ar Spered Santel, dre gomzou ar skritur sakr. *Deus non fecit mortem.* » Guir eo, krouet en deuz peb tra ; ha kement en deuz krouet a zo bresk. Ne badont ket. Ar guez brassa a vez diskarek ; ar bokedou kaerra a zeu da vouenvi ; ar vein galeta a uz, hag en em zebr gant ann amzer. N'euz netra hag a badfe atao var ann douar-ma. Tremmen a ra peb tra. Korf ann den, great gant pri, ha savet enn he zav, gant ann Aotrou Doue, evit rei lojeiz d'ann ene, a dlle ivez, evit doare, uza gant ann amzer, hag evel ann tiez, koueza enn he boull. Evelato, evit guelet ann traou, ne c'hellomp ket atao gouzout mad petr int.

Hervez ar pezh a zesk deomp ar feiz, ann den ne dlie ket klenvel na mervel, evit beza m'oa sempl he gorf, evel aunn traou all, enn dro dezhan. Eul louzou burzudus a ioa great evinthan, gant ann Aotrou Doue ; hag al louzou-ze a dlie miret ouz hon tad kenta, Adam, hag ouz hor mamm genta, Eva, da goll ho iec'hed, ho nerz hag ho iaouankiz. N'ho doa nemet dibri ar frouez euz ar vezenn, hanvet GUEZENN AR VUEZ. — Ar c'henta guech e z'euz bet hano euz ar maro, er bed-ma, eo, pa zifennas Doue dibri euz eur seurt frouez, euz a frouez guezenn ANAOUEGEZ ANN DROUG HAG AR MAD. « Na zebroc'h ket, eme Zoue da Adam, euz a frouez ar vezenn-ze. Rak, ma tebrit euz ar frouez-ze hoc'h sur da vervel. *In quocumque die comederis ex eo, morte morieris.* » Ar maro a zo eta eur gourdrout. Hogen, ne c'hourdrouter ket euz eunn dra, hag a dle en em gaout, n'euz forz petra raffet, pe vad pe fall. Nan, Adam, hag Eva, ha ni, ho bugale var ho lerc'h, non d'oa aoun ebet da gaout rag ar c'blenved ar boan nag ar maro, ma vije bet sentet ouz Doue. Ann drouk-

spered, o velet ez ea re vad ann traou var ann douar-ma, ha dreist oll, oa re zantel ha re eurus ann daou zen kenta, a douel-las anezho, dre gomzou flour ha trom-plus ; hag hon tad hag hor mamm genta a zebras euz ar frouez difennet. Neuze eo bet great ar c'henta pec'hed marvel etouez ann dud. Spountus eo ar freuz a zigoessa ! Kerkent, Doue, eme ar Skritur sakr, a zisklerias da Adam : « Hiviziken, ann douar a vezo milliget abalamour d'id. Ne zougo, anezhan he hunan, nemet spern ha drez : hag evel-se e ranki gounit da vara dioc'h c'huezenn da dal, ken ma zistrei enn douar, m'oud bet tennet anezhan. N'oud, e guirionez nemet poul-trenn, hag e tistrei adarre e poul-trenn. *Quia pulvis es, et in pulverem reverteris.* » Abaoue, e rankomp oll mervel. *Statutum est hominibus semel mori.* Eul lezenn eo, douget gant ann Aotrou Doue a eneb ann den pec'her. Ar maro a zo eta labour, ha pae ar pec'hed marvel. *Stipendia peccati mors.* « Mallos, eme ar Sened a Drant, d'ann nep a nac'ho, en deuz ann den kenta, Adam, tennet varnezhan, dre he

zizentidigez, buanegez, ha drouklans ann Aotrou Doue, ha drez-ze, meritet ar maro, a c'hourdrouze anezhan. *Si quis non confletur primum hominem, Adam, incurrisse per offensam prævaricationis huius modi iram atque indignationem Dei, atque adeo mortem, quam antea illi comminatus fuerat, anathema sit.* « — Nan, Nan, ar zonz, glac'harus meurbed, euz ar maro, ne deue ket guechall da deurel, evel ma ra breman, ar spount, ann anken hag ann dristidigez, e kaloun ann den. Adam hag Eva, araog ho fec'hed, ne vouient ket petra oa ann droublieñ hag ar boan. Eur e voant ; hag ho eurusdet a ioa heb he far. « Dre faot eunn den eme ann abostol Sant Paol, eo deuet ar pec'hed er bed-ma ; ha da heul ar pec'hed, eo deuet ar maro. » Her gouzout a rann ervad, ma renkann kaout poan, klenvel ha mervel, n'euz ken kaoz nemet ar pec'hed mervel ?

Gant ar maro, pebez distruj e korf ann den ! Ar c'horf-ze, great ker kaer gant ann Aotrou Doue, he-unan ! Daoust hag n'en doa ket Doue lakeat he zourn

d'hen ober ? N'euz netra kaerroc'h, koulz lavaret, var ann douar-ma, e-touez ann oll draou krouet. Eunn ear doujet a zo varnezhan. He benn hag he zaoulagad a zo troet varzu ann Env. He deod a lavar ar pec'h a zo enn he spered ; he zaouarn a ziskuez e tle senti pe c'hourc'hemenn. O velet ann den, ec'h anavezzer buhan anezhan evel merour ann Aotrou Doue, er bed-ma. Lakeat oa bet, da vestr var ar pesket, var al labouset, var ar loenet, var peb tra. Plijout a rea kement al labour-ze d'ann Aotrou Doue ma zonzas kendelc'her ar c'horf-ze atao e kreiz he vrud, iac'h hag yaouauk, heb klenvel na mervel. Petra a zo eta c'hoarvezet ? pa zellann breman e gueleñ eur bez, ez euz ennan eur c'horf maro, spountet eo va daoulagad, ha rannet va c'haloungant ar c'hlaç'har. E pe stad truezus eo rentet, gant ar maro, ar c'horf-ze ker kaer diagent ! kleuzet eo ann daoulagad er penn ; ann divoc'h a zo treuzet dizolo ann dent. A hent all, ne jom nemet eskern dizec'het, Mantret ounn o sonjal petra e

teu ann den da veza gant he noblans, he oll zanvez, he nerz, he c'henet, he c'houiziegez ! Setu aze e pe stad e p'euz, pec'hed marvel, lakeat ar c'haerra tam labour, great gant ann ann Aotrou, var ann douar-ma ! Rak, te eo, ha te hebken 'zo kaos euz ann distruj spountus ha mantrus-ze.

Ma e peuz digasset ar maro er bed-ma, ha lakeat anezhi da ren, e touez ann dud, evel eur roue galloudus meurbet, e peuz lazet ivez va ene, kerkent ha m'oud deut em c'haloun. Setu eur gaou all a rez ouzinn, hag a zesk dinn c'hoas ar seiz. Abalamour d'ar maro e roez d'ann ene, oud bet hanvet pec'hed marvel. Eur muntret oud, pec'hed milliget ! « Pa deu ann Aotrou Doue kuit euz eunn ene, eme Sant Aogustin, ann ene-ze a varv ; egiz ar c'horf a gouez d'ann douar maro mik, pa'za ann ene kuit anezhan. » Ann ene eo, a ro buez d'ar c'horf ; evel se ivez, ann Aotrou Doue, dre he c'hraess, a laka ann ene da veva. Ar pec'her, touellet gant ann droug, a daol ann Aotrou Doue er meaz euz he galoun, en eur lavaret dezhan, ne

zentin ket ouzoc'h, *non serviam* : kit kuit, ne rann forz ac'hanoc'h. Ann Aotrou Doue, disprijet gant ar pec'her diskiantet, ne c'hell ket dont er meaz euz ann ene, heb kass ganthan he c'hraess ; ha raktal, ann ene paour a deu da veza, evel eunn dra varo. « Ann ene, a reio eur pec'hed marvel, eme ar prophet Ezechiel, a varvo. *Anima, quæ peccaverit, ipsa morietur.* » N'en deuz mui sklerijenn na tomder ann Env, red evit hen lakaat da veva. Er stad reuzeudik-ze, ann ene a zismantr. « Sevel a ra ennhan, eme Sant Perr Krysolog, c'huez fall ar pec'hed, ha breina-durez ar goall dechou Preon ar goustians a grign ar galoun ; hag ann ene a zo sebeliet er c'horf, evel enn eur bez beo. » « Ann Aotrou Doue, eme c'hoas eunn den santel, enn deuz muioc'h a zonjer ouz ann ene, koezet estad a pec'hed marvel, eget n'en deuz eunn den, euz korf eur c'hi brein. » Ia, ma c'helfemp guelet, gant hon daoulagat, eunn ene, saotret gant ar pec'hed marvel, e velfemp pegen euzus eo !

N'eo ket hebken koll he gaerder, he vir vuez a ra ann ene ; mes, ne c'hell mui

ober netra talvoudeg evit he zilvidigez. Dispartiet euz he Zoue, ann ene a zo henvel euz eur skourr, distaget dioc'h ar vezenn. Ar seo ne zav mui; hag ar skourr ne labour ken. « Kaer em beffe, eme ann abostol Sant Paol, komz evel ma ra ann Elez, rei va oll danvez d'ar paour, ober ar pinijennou ar re galeta, ma n'ema ket karantez Doue em c'haloun, ne ran netra vad. *Nihil mihi prodest.* » Ar skourr, eur vech distaget diouz ar vezenn; ne ra nemet dizec'ha. Koll a ra he zellou, he vleunv, hag ar frouez a ioa ennhan. Ann ene ivez, dre ar pec'hed marvel, a goll, enn cunn taol kount, ann oll meritou, en doa dastumet, a bell-zo, gant kement a hoan. « *Omnes justitiæ, quas fecerat non recordabuntur.* » Paour-glez eo lakeat.

Peger braz n'eo ket bet eta va dallentez, beteg-enn ! Ma tigues-se dinn koll va danvez, va zammik peadra, am be, a dra zur, kassouni ouz ann neb, en deffe va laeret, pe great gaou ouzinn. Daoust ha n'eo ket brassoc'h, ha kalz brassoc'h, siouas ! ar gaou a ra ouzinn ar pec'hed marvel, p'eo guir e ro ar maro d'ann

ene, e laka ac'hanon da goll meritou ann amzer tremenet, hag ar mirit euz ann oll labourou a rann, hag euz ann oll boaniou e c'houzanvan : dre-ze, ne lez netra ganem euz ar vad, em euz great epad va buez. Ia, ar goassa tra evit ann den, er bed-ma, eo ar pec'hed marvel !

Hag er bed all, pebez gaou ne raffe ket ouzinn ? epad m'emaoun e buez, e c'hellann esperout beza pardounet gant va Zalver, bepred leun a vadelez hag a drugarez evidon. Mes, ma teuffe ar maro dinn, epad m'ema va ene er stad truezuz-ze, petra deuffenn da veza ? Krena a rann, pa zonzann. Ne ve Baradoz ebet evidon ! Eno, n'euz ket a zigorr evit ann eneou, kaillaret gant ar pec'hed. Pebez raun galoun ! pebez dizesper ! va ene, krouet evit anaout ha karet he Zoue, er bed-ma, ha dreist oll er bed all ! Petra deuffe da veza ? Hen auzaio a renkann, ma ne c'hellann ket beza eurus, gant va Doue, enn he Varados goude ar maro, e ve goelloc'h dinn, ne vijenn ket biskoas ganet. Ne ket beva a rai neuze va ene, ma ne vez ket gant he Zoue. Ar maro a ve

goell, eget eunn henveled huez. Diou-
ret ho Doue eo brassa poan ann eneo
daonet en Ifern. « karet a rallent mer-
vel ann eneo keiz-ze, eme ar Skritur
Sakr; hag ar maro a deac'h kuit dioutho.
Desiderabant mori, et fugiet mors ab eis. »
Ar zonz euz eur c'holl ker braz a laka
ac'hanon da skrija. Galvet ounn da ge-
meret perz e joa hag enn eured ann
Env; ha ken dudies eo ar joa-ze ma ne
ouie ket ann Abostol sant Paol, penaoz
he rei deomp da anaout, goude beza bet
ann tanva anezhi. Eur vech douget ar
speret betek ann Env, ec'h ankouna-
c'heaz traou ann douar. He zonz n'edo
mui er pezh a dremene enn dro dezhan,
ker karget oa he galoun gant ann eu-
rusded. Pa zistroas ennhan he unan :
« na kaer, na dudies eo ar Barados, e-
mezhan ! Lagad ebet n'en d'euz guele-
t, skouarn ebet n'e deuz klevet, spered
ebet n'en deuz sonjet ar pezh a zo great,
gant Doue, evit ar re a gar anezhan. » Ia,
nag hen a zo euz, ann nep a glev Jesus
o lavaret dezhan : deuz, va zervicher
mad, da gemeret perz e joa da Aotrou,

ha da Zoue. Echu evinthan ar goall am-
zer, amzer ar boan. Ar barrou du ha kriz
a zo eat pell. Amzer ar peoc'h hag ann
diskuiza a zo erruet. Nag e kaver grass
diskuiza, goude beza bet kement all a bo-
niou, dindan a bep seurt amzer, hag e
kreiz pep seurt danjerou ! Nag ar c'hass a
gav ann ene, pa zant, er Barados, ann ear
vad hag ann ezenn iac'hus a ro ar vuez !
Ar Barados ! eurussa bro ! Di eo ounn gal-
vet da vont. Ti va zad eo. Deiz va badi-
ziant, em euz bet an heur-vad da c'henel
d'ar vuez gristen, ha da veza, e guirio-
nez, bugel d'ann Aotrou Doue, hag he
vugel muia karet zoken. Guir e moa da
vont d'ar Barados, evel ar vugale ho deuz
guir da heritout d'ho zad ha d'ho mamm.
Mad, krouadur ingrat ounn bet ! Dispri-
jet em euz eunn Tad ken madelezes. Di-
zentet em euz ounthan ; torret em euz
he lezenn zantel ; kollet ganen dre ar pe-
c'hed marvel, ar guir e moa da vont d'ar
Barados. Mes, anaout a rann kaloun zakr
va Zalver, prest d'am pardouni ! Keus em
euz, ha kaz ouzinn va unan, o velet ounn
bet diskiant avoualc'h d'en em lakaat e

riskl da goll ar barados, va brassa mad !

Ma ne m'euz ket ar Barados, goude ar maro, da beleac'h e z'inn-me ? d'ann Ifern. Rag unan a zaou ! pe ar Barados, gant ann oll joaiou, pe ann Ifern, gant ann oll boaniou. Spountet ounn, pa zonnann e kement-se ! koll ar barados evit leski, da viken, enn eunn tan, c'huezet gant buanegez ann Aotrou Doue. Tan ann douar-ma n'eo ket da lakaat e kemm gant tan ann Ifern. Tan ann Ifern en deuz eunn nerz ali, pa z'o bourreo ar re a zav eheb Doue ; hag ann tan, var ann douar, a zo bet krouet evit mad ann dud. Goulskoude, er bed-ma n'euz poan ebet ker goass hag ann tan. Ne c'hellomp ket gouzanv ann disterra eulvenn tan. Peseurt poan eo eta neuze, poan ann dud daonet ? Beuzet int en eur lennad tan ? hag ann tan-ze ne vougo biken. « *Et ignis eorum non extinguetur.* » Ma teuje c'hoas ar boaniou skrijus-ze da zoussaat ha da derri, ne vije ket ker goass ! Mes, siouas ! pell a-ze ! Bourrevet int, e peb giz, hag heb ehan ebet. Noz-deiz int goasket gant ann dizesper, ar seurt

n'en deuz biskoaz lagad ebet gullet, na skouarn ebet klevet, na spered ebet sonjet. N'euz enn ifern, eme ann avel, enn toull tenval-ze, nemet lenv ha skrign-dent. Klevet a rer bepred mallo-siou spountus, hag ar rebechou ar re c'huerra. Eno, etre ann eneou daonet hag ann drouk-sperejou, n'euz mui a garan-tez ; n'euz nemet kassouni, ha kassouni ar vrassa. Remors ar goustians, evel eur preon, a grign, heb skuiza morse, spered ha kaloun ann eneou keiz-ze. *Vermis eorum non morietur.* — Petra zo kaoz ma'z int kouezet e puns ann Ifern ? Eur vogedenn a enor, eat gant ann avel ; pe vadou, dan-vez deuet dre'n hent fall, hag a zobet red dezho da lezel var holec'h, etre daouarn heritourien ingrat ha digaloun ; pe zoken abalamour da goz-plijadureziou, mes-ventiou, lubrisiteou, plijadureziou an-kenius ha mezuz ! — Evit traou ken dis-ter, ounn en em lakeat var bordik ginou puns ann Ifern ! Nebeud a dra a c'hell rei ar maro dinn, ha va stapla ebars, da viken. Nag a bet a zo e-touez ann dud daonet, ha n'ho deuz ket

great ann hanter, nag ar c'hantved mar-teze euz ar pec'hejou em euz great ! Eur pec'hed marvel a zo avoualc'h evit mont di. O va Doue, anezho trugarez, e vijenn breman enn tan skrijus-ze o tevi, heb esperans ebet mui da zont ac'hano. Va fardounit, me ho ped, ha grit ma kresko, em c'haloun, ar c'heuz da veza bet ken dall, ha ken diskiant. Pa'z ounn koustet deoc'h, o va Zalver, priz ho koad presius, n'am list ket d'em em goll, da goueza enn Ifern.

O va Zalver Jesus, evel Mari Madalen, daoulina a rann ehars treid ho kroas, va esperans em foan, ha ne m'euz nemet-hi. *O Crux, Ave, spes unica.* Ann dour a deu em daoulagad. Gouela a rann d'am pec'hejou, penn kaoz euz ho passion hag euz ho maro. Mantret eo va c'haloun gant ar c'heuz ha gant ar c'hlae'har, pa zonzann enn ho pasianted hag enn ho karantez, ekreiz disme-ganzou ha poaniou ker bras. Hoc'h imaj beniget, ar grusifi a ziskuez dinn ar pezh a lavar ar Skritur sakr. Adalek kern ho penn betek plantou ho treid, ho korf

oll a ioa goloet a c'houliou N'ounn ket souezet. Evit kurunenn, oa bet lakeat deoc'h eur gurunenn spern. Ha petra oa ar gurunenn-ze ? Eunn tourked, great gant skourrou spern, hirr hakalet, sanketenn ho penn adorabl. Ar goad a tlie, a dra zur, diverra ed ho pizach sautel. — Goude beza staget ac'hanoc'h ouz eur peul, eur vandenn soudarded en em lakejont, a rumm da rumm, d'ho skourjeza gant fouetou, begou plomb dezho. Eur vech ho korf dispennet enn eunn doare kenn truezus, n'oa ket c'hoaz peurgountantet malis ar Yuzevien, ann dud kriz ha dinatur-ze ! krial a reant abouez-penn : « ar groaz dezhan ! ra vezo staget ouz ar groaz ! » ha neuze, o va Jesus, ho taouarn hag ho treid sakr a zo bet toulet, ha treuzet gant tachou ouarn, sanket e koat ar groaz. Skrijus eo sonjal enn eunn heavelep tra ?

Er mare-ze, o va Zalver, n'oa den, var menez kalvar, evit ho konsoli, evit kaout truez ouzoc'h. Hoc'h ebetel, ho mignou-net ho doa tec'het kuit, ha lezet ac'hanoc'h enn abandonn. Simon Perr ho na-

c'has abenn teir guech ! Pa voac'h a is-tribill ouz ar groas, ne glevjac'h, enn dro deoc'h, nemet goaperez iud hag euzuz, ar blasfemou ar spountussa. Nan, nan, n'euz ket great kement all d'ar goassa torfe-der, d'ar goassa muntret, na tost zoken ! Fallagriez ha kounnar ann Ifern hag ann douar a ioa, koulz lavaret, dirollet evit sailla varnoc'h ! Petra ho poa great eta, e- vit lakaat kement a zrouk enn dud-ze ? Netra, nemet vad. Daoust ha n'ho poa ket pareet dezho ho zud klanv ? roet ar vuez- da hiniennou a ioa maro ? kelennet anez- ho oll, gant kement a zouder, kement a vir, ma oa, evit doare, eunn dudi si- laou ho prezegennou. Ann aviel a lavar deomp, e z'eant a vandennadou d'hoc'h heul. Peger kaer digemer n'ho doa ket great deoc'h, e kear Jeruzalem, tri dervez araog ho passion, da Zul bleuniou. Ar vro oll a dregarne, a hep tu, gantho. Krial a rent a vouez huel : « Gloar da vab David. Benniget ra vezo ann hini a deu enn hano ann Aotrou Doue. » Hasetu, tri dervez goude, chenchet tu d'ann traou, chenchet santimant gant ann dud-ze, enn

eunn taol-kount. D'ar yaou gambr-lid, ne roent mui da glevet nemet mallosiou, kriadennou a gounnar hag a gassouni. N'ho poa great, goulskoude, o va Jesus, nemet kenderc'hel da gelenn anezho, da barea ho zud klanv. Nau, nan, n'ho doa rezoun vad ebed da voall-gass ac'hanoc'h, na da c'houlenn ho maro, gant eunn hen-velep malis. Er bed-ma, Doue, Mestr ann Env hag ann douar, a gass atao ann traou da benn hervez he volonte ; hag he vo- lonte santel a dle beza bepred doujet hag heuliet. Assantet ho poa, o va Zulver Jesus, gant ho Tad savetei ac'hanomp. Lavaret ho poa dezhan : « va zad, ann of- fransou hag ar sakrifisou, kinniget deoc'h gant ann den pec'her, n'int ket goest a- nezh ho unan, da rapari ar gaou great d'ho Majeste. Re vraz eo ann offans ; ha re vihan, ann digoll. Mad, setu me, ho Mab, Doue evel doc'h, prest da rapari ar pec'hed, ha da ober ho polonte. *Tunc dixi ecce venio ... ut faciam voluntatem tuam.* » Doue, ann Tad, a assantac'h ga- neoc'h, o va Jesus, dre garantez evidomp. Neuze, hoc'h euz kemeret varnoc'h eur

beac'h pounner meurbed, ar mallos a verite va fec'hejou, ha pec'hejou ann oll dud. *Factus pro nobis maledictum.* Evel pa lavarfenn, brüzumet, flastret hoc'b bet, epad ho passion, dindan ar beac'h pounner-ze. *Attristus est propter scelera nostra.* Ho kouliou ho deuz talvezet deomp ar pardoun, ho deuz pareet hon ene. *Livore ejus sanati sumus.* N'eo ket eta ar Yuzevien, nag ar Zoudardet roumen, gant ho fallagriez ha gant ho c'hounnar, a zo bet penn-kaos euz ho maro. N'ho deuz great nemet rei tro deoc'h, o va Zalver karan-tezus, da beurbaea hon dle da justis Doue, ho Tad, evit hor pec'hejou marvel. Lezet ho poa ann dud-ze, touellet gant ann drouk-speret, da voall-gass ac'hannoc'h. *Hæc est hora vestra, et potestas tenebrarum.* Goude ho maro, evel goude eur barr amzer du ha tenval, ann dud-ze a deu d'hoc'h anaout, o va Jesus, evit Mab Doue. « E guirionez, eme ann offiser, ann denn-ze a ioa Mab da Zoue. *Vere filius Dei erat iste.* » Oll, eme ann Aviel, int distroet d'ar gear, euz menez Kalvar, mantret ha glac'haret braz. Skei a rent

var boul ho c'haloun. *Percutientes pectora sua revertabantur.*

Me ivez, o va Zalver Jesus, daoulinet ehars treid ar Groas, e skoann var boul va c'haloun. Renevezet em euz, dré va fec'hejou marvel, dismegansou ha poaniou ho passion. Koupaploc'h ounn, siouas ! eget ar Yuzevien ; ha setu perag, e lavarann deoc'h a greiz va c'haloun : « o va Zalver, pec'het em euz, ha kalz pec'hed ; truez, va Doue. Eur c'heuz braz em euz da veza hoc'h offanset, abalamour ma z'oc'h infinimant mad hag infinimant din da veza karet ha ma tisplich deoc'h ar pec'hed. Ho pedi a rann d'am pardouni, dre ho meritou ; ha me lavar deoc'h n'hoc'h offansinn mui gant sikour ho krass, hag e rinn pinijenn. Evelse bezet great. »

Quimper, 2 Décembre 1890.

IMPRIMATUR

A. SERRÉ,

Vicaire Général.



Diocèse de
Quimper & Léon
Evêché de Quimper & Léon

Document numérisé en 2016